



Bastres
ar gumuniezh
evit reiñ lañs
d'ar Brezhoneg
2025-2030



LANNION-TRÉGOR
COMMUNAUTÉ
LANNUN-TRÉGER
KUMUNIEZH

lannion-tregor.com

Pennad-stur – Edito

Gwelet niver a sevenadurioù o koazhañ, evel ma weler liested ar vuhez o tigrskiñ en natur, zo ur seblant fall evit ar bed. Sichenn bennañ ur sevenadur eo ar yezh, gant se e rank bezañ gwarezet ha lakaet war wel.

Abaoe ouzhpenn mil pemp kant vloaz e vez komzet brezhoneg e Breizh. Yezh an darempredoù etre an dud da gentañ, ur yezh liammet-kreñv ouzh ar pezh zo tro-dro dimp. Bez eo diazez ur glad sevenadurel pinvidik meurbet a welomp bemdez dre an anvioù lec'h, al lennegezh, ar c'hanaouennoù, ar sonerezh hag all...

E-Bro Dreger, lec'h m'eo bev-birvidik ar brezhoneg, e stourmer evit hon sevenadur. Kement-se a vroud Lannuon-Treger Kumuniezh da reneveziñ he brastres evit ar Brezhoneg.

Gant ar brastres-se e fell d'hon c'humuniezh, dre oberoù resis, lakaat ar brezhoneg war wel, lakaat anezhañ da vezañ klevet, da vezañ treuzkaset, da vezañ ur yezh vev war ar pemdez.

Evit dazont ar brezhoneg, e tiskwelomp adarre gant an eil brastres-mañ, ar youl d'ober traoù !

L'appauvrissement de la diversité des cultures, à l'instar de celui de la biodiversité, constitue une menace de notre temps. La langue, qui est le support essentiel d'une culture, doit être protégée et mise en valeur.

Le breton, langue de sociabilité et de convivialité par excellence, imagée, façonnée par ce qui nous entoure est ancrée depuis plus de 1500 ans en Bretagne. Elle constitue le socle d'un patrimoine culturel immatériel d'une richesse remarquable, visible au quotidien tant à travers la toponymie, la littérature, les chants, la musique, etc.

Le Trégor, où la langue conserve une belle vitalité, se mobilise donc pour sa culture. C'est ce qui motive Lannion-Trégor Communauté à renouveler la rédaction d'un schéma en faveur de la Langue Bretonne.

Dans ce schéma, par des actions concrètes, la volonté politique est d'afficher, d'entendre, de transmettre et de faire vivre la langue bretonne au quotidien.

Pour l'avenir de la langue bretonne, nous exprimons à nouveau à travers ce deuxième schéma la volonté d'agir !

Joël Le Jeune,
Kuzulier arbennikaet karget eus sevenadur Breizh
Conseiller spécialisé en charge de la culture bretonne

Taolenn ar pennadoù

A.	Stad an traoù evit ar yezhoù e Breizh hag e Treger	3
1.	Ar brezhoneg e Breizh en deiz hirie	3
2.	... E Bro-Dreger	4
a)	Kelenn er skolioù	4
b)	Ar c'helenn evit an oadourien	6
c)	Ar vuhez sevenadurel e Bro-Dreger	7
B.	Ar politikerezh yezh e Lannuon-Treger Kumuniezh	7
1.	An engouestl da-geñver ar garta Ya d'ar brezhoneg	7
2.	Ar brastres-kumuniezh evit ar brezhoneg	8
3.	Ar brezhoneg ha sevenadur Breizh er raktresoù tiriad	8
4.	Bro arz hag istor e Treger	8
C.	Bilañs ar brastres-kumuniezh 2020-2022	9
1.	Sevel ar brastres yezh 2020-2022	9
2.	Ar palioù hag ar pennaennoù	10
3.	Bilañs ar brastres	10
a)	Kendiviz ha lakaat boutin ar bilañs	10
b)	Bilañs an oberoù	11
4.	Ar soñjoù evit ar brastres nevez	12
D.	Ar brastres yezh nevez evit ar brezhoneg e Lannuon-Treger Kumuniezh	12
1.	Ar mod m'eo bet savet ar brastres	12
2.	Dalc'hoù ha palioù	13
3.	Padelezh ar brastres	14
4.	Kas en-dro ha priziañ	14
5.	Framm ar brastres hag an heñchadurioù nevez	14
a)	An ahel kentañ : Reiñ da welet ha da glevet brezhoneg er vuhez foran	14
b)	An eil ahel : Deskiñ brezhoneg a-rumm-da-rumm	15
c)	An drivet ahel : Bevañ dre ar brezhoneg er vuhez sevenadurel ha war ar pemdez.	17

A. Stad an traoù evit ar yezhoù e Breizh hag e Treger

1. *Ar brezhoneg e Breizh en deiz hirie*

Ur 6 000 yezh bennak a vez komzet er bed en deiz hirie. Hervez an Unesco ec'h ay an hanter da get ac'hann da fin ar c'hantved ma ne vez graet netra. Kollet e vefe ur binvidigezh sevenadurel gant an denelezh, koulz hag ar gouiziegezhioù a zo bet dastumet gant memor ar bobl. N'eo na tonket da vezañ na diremed. Pa lakaer ur politikerezh yezh e pleustr e vez kreñvaet ar strivoù a vez graet gant ar gomzerien evit derc'hel pe reiñ lañs adarre d'o yezh-vamm hag evit treuzkas anezhi d'ar rummadoù da zont.

Kas ur politikerezh yezh evit treuzkas ha talvoudekaat ar brezhoneg, ar yezh keltiek nemeti a vez komzet war kevandir Europa, a sikour difenn al liesseurted sevenadurel pa'c'h eo mad boutin an Denelezh. En deiz hirie eo bet renket ar brezhoneg e-mesk « ar yezhoù en arvar da vont da get » gant an Unesco. Pouezus-bras eo ar sikour digant ar strollegezhioù evit derc'hel ar brezhoneg bev e Bro-Dreger hag e Breizh.

Ar brezhoneg a vez komzet ouzhpenn 1 500 vloaz zo e Breizh hag ar skridoù brezhonek kentañ a zo bet kavet zo eus ar Vvet kantved. Tost eo ouzh ar c'hembraeg hag ar c'herneveureg a vez komzet e Breizh-Veur, hag emañ e rumm ar yezhoù keltiek a vez graet yezhoù predenek anezhe. Er bloavezhioù 1950 e oa bet betek 1 milion a dud hag a gomze brezhoneg, hervez « Fañch Broudig, 2010 »¹, ar yezh keltiek a veze komzet ar muiañ e oa da neuze. Abalamour d'ar cheñchamantoù sokioekonomikel en eil lodenn eus an XXvet kantved e tigreskas trumm an treuzkas er familhoù hag an implij sokial anezhi. Hep an daou dra bouezus-se evit derc'hel bev ar yezh eo aet an niver a vrezhonegerien war zigresk a-galz, pa oa war-dro 207 000 brezhoneger e 2018, ha hervez ar sifroù nevez e vefe war-dro 107 000 brezhoneger e 2024. Dont a ra ar sifroù-se eus disoc'hoù an enklaskoù sokioyezhoniel graet e 2018 ha 2024 a voe gourc'hemennet gant Rannvro Breizh.

Sellet ouzh emdroadur an implij sokial a vez eus ar brezhoneg gant ur studiaden sokioyezhoniel zo pouezus evit sevel ar politikerezhioù yezh lec'hel. Se zo kaoz e voe fiziet un enklask evel-se en ensavadur sontañ TMO e 2018 ha 2024 gant Rannvro Breizh, war Breizh istorel he 5 departamant. A-fet niver a vrezhonegerien e voe renablet 207 000 den e 2018 gant un oad keitat uhel. 79 % eus ar vrezhonegerien a oa 60 vloaz d'an nebeutañ. Diwar an enklask-se e voe lakaet war-wel, dreist-holl, e oa bras pouez ar rummad tud en tu all da 60 vloaz hag e oa ur c'hoant bras-tre e vefe treuzkaset ha kelennet ar yezh. Diskouezet e

¹ Broudig, 2010. Ar brezhoneg Le Breton : Une langue menacée ou une langue officialisée ? KEBK (CNRS, EA 4451) Brest – Langues & Cité Arsella implij ar yezhoù

oa bet e oa tomm-tre an dud ouzh ar brezhoneg hag o doa c'hoant e vefe brasoc'h e blas er vuhez hag er servijoù publik ²

E 2024 e oa aet an niver a vrezhonegerien war zigresk bras, abalamour d'ar pouez a zo gant ar rummad tud war an oad, ha gant-se pouez ar varventez. 58,5 vloaz e oa oad keitat ar vrezhonegerien e 2024 pa oa 70 e 2018.

2. ... E Bro-Dreger

E Breizh emañ Bro-Dreger e-mesk al lec'hioù m'eo bev ar brezhoneg bepred ha ma vez komzet kalzik gant an dud c'hoazh. Hervez ar studiaden gant Rannvro Breizh e 2024 zo 44 % eus an dud hag a glev ar yezh alies a-walc'h, e-kichen 21 % e Breizh-Izel, hag an niver a vrezhonegerien a vefe unan eus ar re uhelañ e Breizh-Izel p'eo 10 % (e-kichen 22 % e 2018). Diwar-se e weler e klot ar pezh a weler e Bro-Dreger gant ar pezh a weler e Breizh a-bezh a-fet pouez demografek, siwazh. An dud e oa ar brezhoneg o yezh-vamm a galon, er parkeier ha gant o mignoned (Kalvez, 2010) zo erru kozh-tre en deiz hirie.³

Abalamour ma veze gwelet evel merk ur statud sokial disteroc'h, evel yezh an amzer dremenet, n'eus ket keit-se c'hoazh, ha lod a soñj an dra-se en deiz hirie c'hoazh, o doa paouezet an dud da gomz brezhoneg ouzh o bugale a-daol-dak. Abaoe ar bloavezhioù 1980 avat zo modoù all da dreuzkas ar yezh, evel ar c'hlasoù divyezhek, ar stummadurioù d'an daoulamm ha kement zo, evit sikour gwareziñ anezhi hag adreiñ talvoudegezh dezhi, ha lakaat pinvidigezh al liesyezhegezh e Breizh war-wel.

E Lannuon-Treger Kumuniezh zo 901 a skolidi en hentadoù divyezhek, 276 oadour er c'hentelioù noz, 17 er stummadur hir e Lannuon gant Scop Roudour.



a) Kelenn er skolioù

Bras a-walc'h eo pouez ar c'helenn divyezhek e Bro-Dreger : 10,9 % eus ar skolidi er c'hentañ derez zo skoliataet en un hentad divyezhek⁴. Tri seurt skolioù zo : ar skolioù publik (Div Yezh), ar skolioù prevez (Divaskell) hag ar skolioù kevredigezhel dre soubidigezh (Diwan). E 2023 e oa 750 skoliad er skolioù-mamm hag er skolioù kentañ derez en holl hentadoù, e Lannuon-Treger Kumuniezh.

² Da lenn e lec'hienn Rannvro Breizh : <https://www.bretagne.bzh/app/uploads/Etude-sur-les-langues-de-bretagne.pdf>


³ Kalvez, 2010. Les mots et les causes : le paradoxe breton. Skol-veur Brest – Langues & Cité – Arsellva implij ar yezhoù

⁴ Da lenn e lec'hienn Ofis Publik ar Brezhoneg : <https://www.fr.brezhoneg.bzh/47-enseignement.htm>




An niver a skolidi dre vloavezhioù ha diouzh ar c'helc'hiadoù, skolioù-mamm, kentañ derez

Sifroù diouzh an hentadoù divyezhek, Diwan, Div Yezh ha Divaskell



Al lec'hioù m'emañ ar skolioù divyezhek, diouzh an hentad

Evit a sell ouzh derc'hel gant ar c'helenn divyezhek en eil derez ec'h a betek al lise, er publik e Lannuon hepken. Ar gêr gentañ e voe e Breizh ma c'halled kenderc'hel gant an hentad publik er skolaj adalek 1989, hag el lise adalek 1993, a-raok Roazhon pe Lannarstêr. Un hentad divyezhek zo ivez e skolaj katolik Sant Jozef e Lannuon abaoe 2014. Kentelioù brezhoneg 3vet yezh a vez graet el Lise Bossuet, met klotañ a ra gant live ar c'hentelioù eil yezh rak skolajidi an hentad divyezhek e Sant Jozef eo ac'h a di. E 2023 e oa 87 skolajiad en holl ha 64 lisead.



Al lec'hioù m'emañ ar skolioù divyezhek, diouzh an hentadoù

Abalamour m'eo kreizennet ar c'hinnig kelenn divyezhek en eil derez e Lannuon ha ma zo un diouer a hentadoù seurt-se er skolajoù-tolead, evel e Plistin, e Landreger pe e Plouared, eo izel-tre an niver a skolidi en eil derez divyezhek. An darn vrasañ eus ar skolidi e CM2, estroc'h evit e Lannuon hag er c'humunioù tost, a baouez gant ar c'helenn divyezhek abalamour m'eo lakaet diaes an dud evit kas o bugale, ingalañ o buhez familh ha kement zo... Dav eo menegiñ e c'hall ar skolidi bet en hentad divyezhek e Kawan derc'hel gant ar brezhoneg e skolaj Bear.

Er rouedad Diwan ec'h a ar skolidi kentañ derez da skolaj Diwan Plijidi (bro Gwengamp), a zegemer skolidi zo eus an hentadoù all ivez. Skolaj Plijidi zo leun-chouk avat hag ar savadurioù zo en ur stad fall. Er mareoù-mañ e vezer o studiañ al labourioù a vefe d'ober eno, pe penaos lakaat ar skolaj da zilojañ zoken.

b) Ar c'helenn evit an oadourien

Abaoe 1996 zo un « Emglev-bro » (ul label hag a zo anavezhet gant Rannvro Breizh) e Bro-Dreger. E « Ti ar Vro Treger-Goueloù » zo bodet kevredigezhioù sevenadurel breizhek staliet e Bro-Dreger ha Bro-Oueloù. Tost da 35 kevredigezh sevenadurel zo kevredet ennañ en deiz hirie hag ouzhpenn 350 den zo ezel anezhañ.

Labourat a ra ar gevredigezh evit brudañ ar brezhoneg ha sevenadur Breizh e meur a vod : aozañ abadennoù, degemer e Treger hag e Goueloù abadennoù rannvroel meur, aliañ ar strollegezhioù a-fet brezhoneg ha sevenadur Breizh, merañ ur servij bugale-yaouankiz, kelenn brezhoneg d'an oadourien (276 oadour e 2023) ha kenurzhiañ ha buheziñ an dalc'had teulioù brezhonek a zo en estaj diwezhañ e levraoueg Aodoù-an-Arvor. Ti ar Vro a gemer perzh en aozadur ar genstrivadeg etreliseoù evit sonerezh Breizh.

En deiz hirie zo binvioù nevez evit deskiñ pe kaout un tañva eus ar brezhoneg, evel Desketa, ur benveg kelenn niverel enlinenn savet gant Ofis publik ar brezhoneg.

c) Ar vuhez sevenadurel e Bro-Dreger

A-hed ar bloaz e vez aozet abadennoù a bep seurt gant ur rouedad kevredigezhioù stank ha birvidik-tre, evel festoù-noz, beilhadegoù, sonadegoù, stajoù sonerezh ha troioù-bale kanet da skouer.

Ar beilhadegoù e Bro-Dreger zo lec'hioù n'o deus ket o far evit ar brezhoneg komzet. Gante e weler pegen bev eo ar yezh ha reiñ a reont tro d'ar gonterien, kanerien ha sonerien eus ar vro da vont war al leurenn, koulz an deraouidi hag an dud ampart, dirak ur mor a arvesterien.

E deroù ar bloavezhioù 70, hag abalamour d'an troc'h e treuzkas ar brezhoneg er familhoù, e voe krog tud zo da zastum ar glad dizanvezel sevenadurel da-heul krouidigezh ar gevredigezh Dastum a labour e Breizh a-bezh. Digoret e voe ur skourr e Bro-Dreger e 1979. Sikour a ra derc'hel ar memor stroll ha pourchas a ra danvez d'al levraoueg son rannvroel a zo un toullad mat a roudennoù son enni. Ouzhpenn 50 000 restr a voe renablet e 2023 da-geñver an hanter-kant vloaz.

B. Ar politikerezh yezh e Lannuon-Treger Kumuniezh

Un toullad bloavezhioù zo e vez kaset ur politikerezh yezh gant Lannuon-Treger Kumuniezh evit brudañ ha treuzkas ar brezhoneg da-geñver he folitikerezhioù hag he barregezhioù. Abaoe 2011 dre ar Garta Ya d'ar Brezhoneg hag e 2019 pa voe aprouet ur brastres-kumuniezh evit ar brezhoneg.

1. *An engouestl da-geñver ar garta Ya d'ar brezhoneg*

E 2011 e voe sinet al live 1 eus ar Garta « Ya d'ar Brezhoneg », kaset gant Ofis publik ar brezhoneg, gant Lannuon-Treger Kumuniezh. Kendalc'het e voe da gas oberoù da benn evit brudañ ar brezhoneg, ken a voe resevet al live daou e 2013. E 2014 e voe graet enor d'al labour-se pa voe tapet ur priz er « Prizioù » roet gant Frañs3 Breizh hag Ofis publik ar brezhoneg. E 2024 e voe resevet ur priz c'hoazh er Prizioù gant Lannuon-Treger Kumuniezh evit bezañ lakaet ar yezh war-wel er mirva natur rannvroel e Plounerin.

Pal ar garta eo broudañ ar sinerien da vrudañ ar brezhoneg gant oberoù fetis hag a sell alies ouzh staliañ skritelloù ha pannelloù. Ar pennadoù-stur, ar pedadennoù, ar paper talbennet, ar c'hartennoù-bizit, al logo, ar panellerezh diabarzh ha diavaez divyezhek, war ar c'hirri-tan, sed aze oberoù lakaet e pleustr gant an tolpad-kêrioù hag o deus graet dezhañ tapout al label.

2. *Ar brastres-kumuniezh evit ar brezhoneg*

Da-heul al lañs a oa abaoe meur a vloaz evit tapout al label evit ar garta Ya d'ar Brezhoneg e teuas ar c'hoant da vont pelloc'h ha da gas muioc'h a oberoù evit brudañ ar brezhoneg, ha se zo kaoz e voe savet ur brastres yezh. Graet eo an teul-se evit brudañ ar brezhoneg dre kement politikerezh ha kement barregezh a zo gant Lannuon-Treger Kumuniezh.

Aprouiñ ur brastres a oa ur mod da sklaeraat ha da sevel ur framm evit politikerezh yezh LTK ha da c'hallout kas ur politikerezh oberoù da benn evit ar c'humunioù a zo er gumuniezh.

Lakaet e voe tri ahel pe tem war-wel, diazezet war barregezhioù ha politikerezhioù LTK.

Kinniget e voe :

- Lakaat ar brezhoneg war-wel er vuhez foran evit reiñ muioc'h a blas d'ar yezh el lec'hioù foran evit an dud a zo o chom er c'horn-bro hag ar weladennerien.
- Treuzkas ar brezhoneg evit suraat an implij anezhañ er vuhez sokial, ar bazenn gentañ pouezus evit ober anaoudegezh gant sevenadur Breizh.
- Bevañ e brezhoneg ha gant sevenadur Breizh evit lakaat ar brezhoneg da vezañ ur yezh pemdez, evit reiñ da gompren pegen pinvidik eo sevenadur Breizh ha degas c'hoant d'an dud d'ober ganti.

Ar pal eo ober traoù da glokaat politikerezh ar Rannvro ha brastres departamant Aodoù-an-Arvor.

3. *Ar brezhoneg ha sevenadur Breizh er raktresoù tiriad*

Emañ ar politikerezh evit ar brezhoneg e Lannuon-Treger Kumuniezh e kement raktres tiriad a vefe. Talvezout a rae eus 2017 da 2020 hag aprouet e voe d'an 22 a viz Even 2017. Merket e oa ennañ e oa evit talvoudekaat ar brezhoneg ha sevenadur Breizh hervez ar pal 3.6 « diorren ar pleustroù a bep seurt a zo a-fet sevenadur ha sport » en dae 3 « Bevañ kengred ».

Er raktres tiriad a dalvez bremañ, « War-du 2040 », a voe aprouet d'an 29 a viz Even 2021, zo kaoz eus ar politikerezh yezh dre an Dae « Bevañ kengred » ; er chanter niverenn 15 : « kemer perzh e diorren an tiriad war dachenn ar sevenadur hag ar sport » ; hag un tamm hiroc'h er pal 46 : treuzkas ha lakaat boutin an arzoù, ar sevenadur hag ar glad.

4. *Bro arz hag istor e Treger*

D'an 29 a viz Du 2022 e voe labelaet Lannuon-Treger Kumuniezh « Bro arz hag istor » gant ministrerezh ar sevenadur. Al label-se a laka war-wel an tiriadoù a ro bec'h evit brudañ kalite ar savadurioù, an ardremez hag ar c'hêrioù enne, ha hini o

glad kaer, hag evit kement-se e lakaont ur politikerezh oberiant e pleustr a-fet anavezout, gwareziñ, hanterañ ha talvoudekaat.

Termenet e voe tri ahel labour hervez perzhioù ar vro :

- Glad ar savadurioù hag ar maezioù : ur Vro he glad stank, lieseurt ha strewet en un ardremez doñvaet.
- Glad sevenadurel dizanvezel : ur Vro ma kaver kichen-ha-kichen lennegezh dre gomz ha dre skrid, sevenadurioù poblek ha helennek.
- Glad ha nevezadennoù : ur Vro a gemmoù hag a ijinadennoù.

An eil ahel a laka ar brezhoneg war-wel ha brezhoneg Treger dreist-holl evel ar stumm pennañ eus ar glad sevenadurel dizanvezel lec'hel.

Liammet start eo ar politikerezh yezh ouzh hini ar Vro arz hag istor. Gante e vez lakaet ar brezhoneg evel ur perzh eus ar glad er vro arz hag istor da vezañ war un dro gant ar brezhoneg gwelet er brastres yezh evel ur yezh vev en deiz hirie e 2024 e Bro-Dreger.

C. Bilañs ar brastres-kumuniezh 2020-2022

1. Sevel ar brastres yezh 2020-2022

Harpet e voe ar brastres yezh gant ur strollad dilennidi hag a felle dezhe kemer perzh, koulz er gumuniezh hag en tiez-kêr, gant an ao. L'Hérec Patrick, maer Plounerin, da brezidant ar strollad. Ar strollad-se, ennañ 23 dilennad, en o mesk Joël Le Jeune, Prezidant ar gumuniezh tolpad-kêrioù d'ar mare-se, a oa bet bodet 5 gwech etre 2018 ha 2019. Da neuze e voe choazet danvez an oberoù, divizet frammañ ar brastres hervez tri ahel ha kas an traoù da benn en ur ober 3 bloavezh.

Savet e voe an teul-se diwar disoc'hoù daou enklask ivez. An hini kentañ, unan sokioyezhoñiel diwar-benn ar yezhoù e Breizh, a voe graet e 2018 gant an ensavadur sontañ TMO war goulenn Rannvro Breizh. An eil a voe graet e 2019 e diabarzh ar strollegezh, e-mesk implijidi Lannuon-Treger Kumuniezh, diwar-benn o anaoudegezh eus ar brezhoneg hag o interest evitañ.

Skiant-prenet Kuzul-departamant Penn-ar-Bed ha Kemperle Kumuniezh, a zo div strollegezh er penn a-raok war dachenn ar politikerezhioù yezh lakaet e pleustr e Breizh, he doa sikouret empennañ ha sevel ar brastres.

Ur bodad mailhed teknikel a voe savet ivez, ennañ 10 oberour eus ar vro, evit en em soñjal ha kinnig traoù. Emañ roll an dud-se amañ dindan.

Roll ar bodad mailhed teknikel :

- Ofis publik ar brezhoneg

- An Emglev-bro « Ti ar Vro Treger-Goueloù »
- An hentadoù skol (Diwan, Div Yezh Lannuon ha Div Yezh Breizh, Divaskell)
- Kuzul ar Brezhoneg
- Kreizenn sevenadurel Lannuon
- Kreizenn ar son e Kawan
- Kreizenn sevenadurel geltiek Sant-Gwenole en Trevoù

E LTK e oa bet aozet ar c'haozeadennoù diabarzh gant ar servijoù ha skrivet ar brastres gant ar c'hargad a gefridi evit ar brezhoneg, an eilpennrenerez ha renerez ar servijoù kehentiñ.

2. *Ar palioù hag ar pennaennoù*

Ar palioù :

- Brudañ ar brezhoneg ha pinvidigezh ar glad sevenadurel dizanveze e Breizh
- Stummañ brezhonegerien nevez evit treuzkas ar yezh ha reiñ un amzer-da-zont dezhi
- Sikour gwareziñ ha lakaat ar glad yezhel war-wel (anvioù lec'h, anvioù familh...)
- Brudañ an implij eus ar yezh, reiñ da welet ha da glevet brezhoneg er vuhez foran, abalamour da lakaat anezhañ da vezañ yezh ar pemdez

Ar pennaennoù :

- Kemer ar brezhoneg e kont er mod da lakaat ar politikerezhioù hag ar servijoù e LTK e pleustr, en ur mod treuz
- Tennañ a ra ar brastres d'ar yezh ha war un dro e tigor an hent da « zanvez sevenadurel » Breizh
- Klokaet e vo da-geñver ar rann « glad dizanvezel » a zo er Steuñv ober evit « Bro Arz hag Istor », ac'h a asambles gant ar brastres evit ar brezhoneg

3. *Bilañs ar brastres*

a) Kendiviz ha lakaat boutin ar bilañs

Ur strollad nevez gant dilennidi er gumuniezh hag en tiez-kêr a felle dezhe kemer perzh a voe savet e 2024, gant an ao. Joël Le Jeune, kuzulier dileuriet evit sevenadur Breizh, da brezidant. Bodet e oa bet pemp gwech etre miz Genver ha miz Mae 2024 evit ober ur bilañs. E-kerzh pep emvod e veze studiet un ahel ha kinniget ar bilañs anezhañ.

11 a viz Genver 2024	<i>Emvod kentañ gant an dilennidi-kumuniezh, evit kregiñ gant ar bilañs</i>
21 a viz C’hwevrer 2024	<i>Ur bilañs eus an ahel kentañ – lakaat ar brezhoneg war-wel er vuhez foran – prezegenn gant Guillaume Morin OPAB</i>
20 a viz Meurzh 2024	<i>Ur bilañs eus an eil ahel – treuzkas ar brezhoneg</i>
17 a viz Ebrel 2024	<i>Ur bilañs eus an drivet ahel – Lakaat ar brezhoneg ha sevenadur Breizh da vevañ – prezegenn gant Patrick Pichouron – Label Bro Arz hag Istor</i>
29 a viz Mae 2024	<i>Emvod e Planetarium Breizh, un abadenn vrezhonek gant an arvest « koskoriad an heol », sintezenn ar bilañs hag en em soñjal war ar brastres</i>

Pinvidik e voe ar c’haozeadennoù ha diwar-se e voe resisaet oberoù zo er brastres. Sed aze an traoù a voe lakaet ar gaoz warne :

- Lakaat ar gaoz war ar brezhoneg gant ar c’humunioù da-geñver an emvodoù poloù.
- Kenderc’hel gant al labour panellerezh (reizhañ, broudañ an dud da dreiñ, lakaat an div yezh par-ouzh-par), adwelet ar garta da lakaat an divyezhegezh e pleustr,
- Lakaat an oberoù hag an abadennoù brezhonek muioc’h war-wel, Soñjal en a-raok en oberoù kehentiñ a-ratozh, mont war dachenn an niverel,
- Stummañ ar wazourien war ar brezhoneg, kentelioù diabarzh, stummadur gant CNFPT, al levrig evit an dud nevez-en em gavet,
- Kenlabourat muioc’h gant ti an douristed,
- Harpañ ar c’hoariva brezhonek,
- Kinnig lennadennoù foran, kenlabourat gant KD22 hag an dalc’had e levraoueg Aodoù-an-Arvor

b) Bilañs an oberoù

Kemeret eo bet ar brezhoneg e kont gant ar servijoù en o c’hefridioù, evel ar servij kehentiñ, hini ar sevenadur ha kalz reoù all. Lakaet eo bet ar brezhoneg gwelloc’h war-wel d’an dud ha d’ar wazourien.

Gant ar c’hentelioù brezhoneg a vez aozet e-kerzh an ehan kreisteiz hag ar goulennaouegoù evit ar wazourien diwar-benn al liamm o deus gant ar brezhoneg eo bet brudet gwelloc’h ar yezh en Tolpad-kêrioù.

Abalamour d’an diouer a lañs hag a genurzhiañ gant ar brastres ec’h eo sklaer zo ezhomm da harpañ ar servijoù war an dachenn-se a-fet danvez, kinnigoù ha kevelerien gant obererien lec’hel, evit mont pelloc’h gant an oberoù ac’h a d’ober ar brastres.

Gant ar brastres e vez lakaet ar brezhoneg e barregezhioù ha politikerezhioù LTK ha re he c'hevelerien, ouzhpenn an engouestloù a voe dibabet da-geñver al live 2 er garta Ya d'ar Brezhoneg. Un diazez solut eo neuze evit an hini a zeu.

4. *Ar soñjoù evit ar brastres nevez*

Da-heul ar c'haozeadennoù a oa bet e strollad an dilennidi evit ar brezhoneg zo bet kinniget ober gant framm ar brastres yezh kentañ a-fet stumm hag a-fet danvez, anez ankouaat skrivañ ar fichennoù gant evezh evit resisaat an oberoù.

Ouzhpenn sintezenn ar c'haozeadennoù evit ar bilañs eo bet renablet an 'ezhommoù' a-fet brezhoneg e LTK evit ar brastres da zont. Gerioù-alc'hwez, e brezhoneg, zo bet dibabet evit diskwel ar soñjoù a zo deuet war-wel diwar sevel mare ar bilañs.

Klevet : klevet muioc'h ar yezh er vuhez pemdez hag er servijoù publik.

Brudañ : sikour da reiñ muioc'h a vrud d'an abadennoù brezhonek a vez aozet e Lannuon-Treger Kumuniezh.

Treuzkas : skolaj / lise / krennarded ha bugaligoù. Lakaat ar pouez war an tremen eus ar skol kentañ derez d'ar skolaj, pa weler zo kalz a vugale hag a chom a-sav gant ar brezhoneg (n'eus nemet $\frac{1}{4}$ eus ar skolidi a gendalc'h er skolaj goude ar CM2), sikour digeriñ modoù diwall e brezhoneg

Liamm : krouiñ liammoù etre an obererien er vro, ar skolaerien, al levraouegoù, asambles gant levraoueg Aodoù-an-Arvor hag an dastumad levrioù brezhonek a zo enni.

Labourat e brezhoneg : labourat war an dazont micherel e brezhoneg, gallout aliañ ar skolidi, kavout stajoù e brezhoneg.

D. Ar brastres yezh nevez evit ar brezhoneg e Lannuon-Treger Kumuniezh

1. *Ar mod m'eo bet savet ar brastres*

Goulennet e voe digant an ao. Joël Le Jeune, maer Tredraezh-Lokemo ha kuzulier arbennikaet karget eus sevenadur Breizh e Lannuon-Treger Kumuniezh, sevel ar brastres-mañ.

Savet e voe ur strollad labour a-ratozh, ennañ 20 kuzulier er gumuniezh hag en tiez-kêr hag a felle dezhe kemer perzh, evel evit ar brastres yezh kentañ. Bodet e voe 8 gwech e 2024 evit ober bilañs ar brastres kent ha sevel an hini nevez. Frouezhus ha talvoudus e voe ar c'hendivizoù evit lakaat ar brastres da vont diouzh stad an traoù en deiz hirie.

Emvodoù ingal a oa bet gant kevredigezhioù hag ensavadurioù ar vro a labour war dachenn ar brezhoneg ha glad sevenadurel dizanvezel Breizh, evel Ti ar Vro Treger-Goueloù pe Ofis Publik ar Brezhoneg hag obererien all, d'ar preder evit sevel ar brastres da vezañ pinvidikoc'h. Komzet zo bet gant ar servijoù ivez, abalamour da reiñ muioc'h a blas bepred d'ar brezhoneg er politikerezhioù hag ar barregezhioù a vez lakaet e pleustr en deiz hirie.

E 2024 e voe adc'hraet un enklask e-mesk gwazourien LTK diwar-benn o interest hag o anaoudegezh eus ar brezhoneg, da-geñver ar brastres nevez. Graet e oa bet war ar memes patrom evel an hini a oa bet kaset da benn e 2019, gant goulennoù damheñvel, evit gwelet ar cheñchamantoù hag an nevezentioù war-fet ar vugaligoù, ar vugale hag ar re yaouank, hag ar stummadurioù war ar micherioù.

2. Dalc'hoù ha palioù

Goude an emvodoù e voe termenet an dalc'hoù hag ar palioù amañ da-heul. Darn eus ar re a oa er brastres kent int, ha klokaet int bet.

An dalc'hoù

- Brudañ ar brezhoneg ha pinvidigezh glad sevenadurel dizanvezel Breizh,
- Kemer perzh en oberoù evit gwareziñ ar brezhoneg hag an dazont anezhañ,
- Brudañ an implij sokial eus ar brezhoneg, lakaat anezhañ war-wel evel yezh vev er vuhez foran, koulz e-mesk tud ar vro hag ar weladennerien (sachañ tud nevez etrezek hon bro), abalamour d'ober dezhañ bezañ ur yezh pemdez.
- Sikour Tregeriz da zerc'hel da berc'hennañ pe da adperc'hennañ ar brezhoneg,
- Eus ar yezh zo kaoz er brastres da gentañ, ha war ar memes tro eo digor war « danvez sevenadurel » Breizh a lakaer ar gaoz warnañ en eil ahel Bro arz hag istor, glad sevenadurel dizanvezel ar vro-mañ m'eo liammet al lennegezhioù dre gomz ha dre skrid, ar sevenadurioù pobl ha gouiziek.

Ar palioù

- Kemer ar brezhoneg e kont, en ur mod treuz, er politikerezhioù hag er servijoù a zo e LTK hag er frammoù liammet outi, KOSE, Lannuon-Treger Kenskoazell, OTK, KEK/KPLT,
- Diorren ur politikerezh oberiant evit ar brezhoneg e servij ar c'humunioù a zo enni,
- Ober traoù da glokaat politikerezh ar rannvro ha brastres departamant Aodoù-an-Arvor,
- Tizhout live 3 ar garta Ya d'ar Brezhoneg

3. Padelezh ar brastres

Divizet zo bet hiraat padelezh ar brastres-mañ betek 5 bloaz gant ar strollad dilennidi evit ar brezhoneg, evit 2025-2030, abalamour da c'hallout lakaat an oberoù e pleustr e-pad ur mare hiroc'h ha war hir dermen.

4. Kas en-dro ha priziañ

E 2023 e voe krouet ur post evit kenurzhiañ ha kas ar brastres en-dro. Ul liamm espres a vo da grouiñ gant ar servij sevenadur en tolpad-kêrioù a ra war-dro buheziñ ar Vro arz hag istor e Bro-Dreger, pa bled an eil pennahel gant ar glad sevenadurel dizanvezel. Ur fichenn ober zo bet savet diwar-benn kement-se.

E-kerzh mare talvoud ar brastres e vo aozet, d'an nebeutañ, daou emvod ar bloaz gant ar strollad dilennidi hag un emvod gant an dud a labour war dachenn ar brezhoneg.

Savet ha kinniget e vo ur bilañs bloaziek eus an oberoù.

5. Framm ar brastres hag an heñchadurioù nevez

Miret eo bet ar framm e 3 ahel evit ar brastres nevez, resisaet an titloù (e druz hag islinennet en daolenn da-c'houde) da-heul ar c'hendivizoù, ha 6 fichenn ober nevez zo bet lakaet ouzhpenn.

Ahel 1	Ahel 2	Ahel 3
Reiñ da welet ha <u>da glevet</u> brezhoneg er vuhez foran	Deskiñ brezhoneg a-rumm-da-rumm	Bevañ dre ar brezhoneg <u>er vuhez sevenadurel ha war ar pemdez</u>
6 fichenn ober (2 ouzhpenn)	5 fichenn ober (1 ouzhpenn)	14 fichenn ober (3 ouzhpenn)

a) An ahel kentañ : Reiñ da welet ha da glevet brezhoneg er vuhez foran

Da gentañ, e-barzh politikerezhioù ha barregezhioù LTK, eo pouezus-bras o defe tro ar vrezhonegerien a-vihanik, ar vrezhonegerien nevez hag an dud a zo o teskiñ, da lenn ha da glevet brezhoneg en o buhez pemdez. Kemeret e vo ar brezhoneg e kont e-barzh an holl deulioù titouriñ ha kehentiñ (OTK, KOSE, LTK, KEK, KPLT....).

Flokañ ar c'hirri, lakaat pannelloù divyezhek, e diavaez hag e diabarzh ar savadurioù, en takadoù meret gant ar strollegezh, a vo graet bep taol. Ar garta Ya d'ar brezhoneg hag an oberoù dibabet a vo lakaet e pleustr e-barzh an holl bolitikerezhioù ha gant an holl servijoù publik stag ouzh he c'hefridioù.

Er brastres e kinniger rannañ oberoù an ahel gentañ e c'hwec'h fichenn ober :

Evit a sell ouzh kefridioù LTK e kinniger ober evel-henn :

- An ober kentañ (sellet ouzh ar fichenn ober 1.1) eo lakaat ar brezhoneg war-wel e-barzh an holl deulioù gant LTK, gant-se e vo adwelet an teulioù-se ha savet ur garta c'hrafek a-vod. Amañ eo renablet ar modoù pennañ da lakaat an divyezhegezh e pleustr hag ar skoroù kehentiñ hag embann dre ar munud. Gant an ober-mañ e kinniger mont diouzh ar garta « Ya d'ar brezhoneg » e pep degouezh.
- An eil ober (sellet ouzh ar fichenn ober 1.2) evit derc'hel pelloc'h gant ar panellerezh divyezhek diabarzh ha diavaez. Graet eo evit bezañ par-ouzh-par gant ar galleg war an dachenn c'hrafek. E-barzh ar garta evit lakaat an divyezhegezh e pleustr eo displeget ar modoù d'ober.
- An drivet ober (sellet ouzh ar fichenn ober 1.3) evit reiñ da glevet brezhoneg er vuhez foran gant bandennoù son ha krouidigezhioù son brezhonek en aveadurioù ar gumuniezh, ha dre gevelerezhioù nevez gant oberourien all er vro-mañ. Un ober nevez eo.
- Ar bevarvet ober (sellet ouzh ar fichenn ober 1.4) evit lakaat ar brezhoneg muioc'h war-wel war an dachenn niverel, gant ar skoroù niverel bet savet dija, da lavaret eo dre lec'hienn internet LTK hag ar rouedadoù sokial. Un ober nevez eo.
- Ar bempvet ober (sellet ouzh ar fichenn ober 1.5) evit lakaat oberoù ar garta « Ya d'ar brezhoneg » e pleustr en tolpad-kêrioù, klask tapout an drivet live eus ar garta ha kenurzhiañ ar brastres-mañ.

Evit a sell ouzh oberourien an tiriad e vezer e-sell da gas an oberoù-mañ da benn :

Er c'hwec'hvet ober (sellet ouzh ar fichenn ober 1.6) eo displeget dre ar munud ar palioù a-fet buheziñ ha brudañ ar brezhoneg er c'humunioù, diouzh un tu o vrudañ ar garta « Ya d'ar brezhoneg » e-barzh an tiez-kêr, ha diouzh un tu all o skoazellañ anezhe p'o dez goulennnoù hag ezhommoù resis.

b) An eil ahel : Deskiñ brezhoneg a-rumm-da-rumm

Sintezenn an enklask evit gouzout pegen talvoudus hag anavezet eo ar brezhoneg ha sevenadur Breizh e-mesk implijidi LTK

E miz Even 2024 e oa bet graet un enklask e-mesk implijidi LTK. 170 a wazourien e Lannuon-Treger Kumuniezh o doa respontet, da lavaret eo 23 % eus an implijidi goulennetaet, evit lavaret pegen talvoudus e kavont ar brezhoneg ha sevenadur Breizh. Adc'hraet e oa bet an enklask dre bostel hepken, hag e-sell e vezer d'ober enklaskoù spisoc'h all da-geñver ar brastres e-barzh ar servijoù a vez

e darempred war-eeun gant an dud. Dav eo notenniñ zo 46 den hag o deus bugale divyezhek (da lavaret eo 27 % eus ar re o deus respontet).

Gant an enklask eo bet lakaet war-wel ar c'hoant o deus an implijidi da zeskiñ pe da wellaat o barregezhioù war ar brezhoneg (embannet eo bet ar soñj-se gant 81 den, da lavaret eo 47 % eus ar re o deus respontet). Diwar 170 respont (20 % eus ar respontoù a zo bet kaset dre bostel) zo 68 gwazour (40 %) gant barregezhioù diazez ha 15 gwazour (9 %) a c'hall kaozeal.

Ouzhpenn un drederenn eus ar wazourien o deus respontet ec'h eo ar brezhoneg un dra vat evit ober o labour hag 81 gwazour (48 %) a fellfe dezhe ober ur stummadur war ar brezhoneg. Ar wazourien a ziskouez bezañ dedennet gant an daou seurt stummadurioù kinniget gant palioù disheñvel, da lavaret eo evit deskiñ ar yezh eviti hec'h-unan diouzh un tu, hag evel stummadur micherel diouzh an tu all. Dav eo notenniñ zo 36 den hag a fellfe dezhe ober un ehan-stummañ evit mont en ur c'hursus d'an daoulamm.

Bras eo ar goulenn evit kaout kentelioù ha prezegennoù war danvez sevenadurel Breizh (istor, lec'hanvadurezh, sonerezh ha kement zo), dreist-holl e-pad an ehan kreisteiz. Etre ugent ha tregont gwazour a vez bep bloaz er c'hentelioù aozet gant Ti ar Vro e-pad an ehan kreisteiz e sez LTK hag e Landreger.

Oberoù an eil ahel evit sikour treuzkas ar brezhoneg

Un dachenn pouezus-bras eo evit ma chomfe bev-buhezek ar brezhoneg. Savet eo bet an eil ahel evit broudañ ar wazourien hag an dilennidi, e LTK hag en tiez-kêr, da zeskiñ brezhoneg.

Gwellat e vo plas ar brezhoneg e bed ar vugaligoù (takadoù liesdegemer hag Erlec'hioù bugaligoù) hag e-kerzh an obererezhioù bugale-yaouankiz (Degemer dudi hep herberc'h, chomadennnoù vakañsiñ).

An ahel-mañ zo bet savet evit an holl dud hag an obererien er vro. Evit klokaat anezhañ e vo savet ur rouedad asambles gant obererien an treuzkas abalamour da aesaat d'an dud deuet ha d'ar skolidi deskiñ brezhoneg. Ha savet e vo ur fichenn ober a-ratozh diwar-benn ar raktresoù micherel war dachenn ar brezhoneg.

Er brastres-mañ e kinniger rannañ an eil ahel e pemp fichenn ober :

Evit a sell ouzh kefridioù LTK e kinniger ober evel-henn :

- An ober kentañ (sellet ouzh ar fichenn ober 2.1) evit reiñ lañs ha gwellaat implij ar brezhoneg e-mesk an implijidi hag an dilennidi abalamour da gaout tud divyezhek prest da lakaat ar brezhoneg war-wel er vuhez sokial da-geñver o c'hefridioù hag o darempredoù gant an dud. Dalc'het e vo gant ar c'hentelioù a oa bet lañset gant ar brastres kent war ar brezhoneg

ha danvez sevenadurel Breizh. E-kerzh ar brastres-mañ e vo savet ur steuñv evit stummañ ar wazourien.

- An eil ober (sellet ouzh ar fichenn ober 2.2) evit lakaat ar vugaligoù d'ober anaoudegezh gant ar brezhoneg ha, diouzh an dro, reiñ lañs d'an divyezhegezh abred e-mesk ar re vihanañ evit kreñvaat ha lakaat chadenn ar yezh da badout e Treger. Evit en ober e vo kemeret harp war implijidi divyezhek (degas gerioù brezhoneg evit an traoù pemdez) ha/pe war bourchaserien diavaez (lakaet da zont ur wech ar mare). An ober-mañ a vo meret gant KOSE, gant asant ar gevelerien a zo er vro.
- An drivet ober (sellet ouzh ar fichenn ober 2.3) evit aesaat d'ar vugale ha d'ar re yaouank ober gant ar yezh hag anavezout ar glad sevenadurel dizanvezel er c'hreizennoù-dudi hag er chomadennoù vakañsiñ (servijoù KOSE). Kaset war-raok asambles gant an obererien er vro.

Evit a sell ouzh an holl dud hag an obererien er vro e vezer e-sell da gas an oberoù-mañ da benn :

- Ar bevarvet ober (sellet ouzh ar fichenn ober 2.4) evit lakaat an niver a yezherien da greskiñ hag an anaoudegezh/implij eus ar brezhoneg da badout e Bro-Dreger, dre an hentoù a bep seurt a vez kinniget d'an dud dre-vras, d'an dud deuet ha d'ar skolidi evit deskiñ brezhoneg. Kaset e vo asambles gant an holl obererien.
- Ar bempvet ober (sellet ouzh ar fichenn ober 2.5) evit sellet a-dostoc'h ouzh tem ar raktresoù micherel e brezhoneg : penaos soñjal mont war ur vicher e brezhoneg en amzer-da-zont pa vezer ur c'hrennard pe un den deuet hag a zo o cheñch oberiantiz, ha penaos bezañ gwell eus ar varregezh-se. Un ober nevez eo.

c) An drivet ahel : Bevañ dre ar brezhoneg er vuhez sevenadurel ha war ar pemdez.

Savet eo bet an drivet ahel evit aesaat implij sokial ar brezhoneg hag evit lakaat anezhañ da vezañ talvoudus e buhez pemdez ar wazourien, tud ar vro hag an douristed.

An ahel stankañ eus ar brastres eo. Sellet a ra ouzh meur a gefridi ha meur a bolitikerezh e LTK, ha liammet eo ivez ouzh tachenn al lenn / al lennegezh, an arvestoù-bev e brezhoneg, ar mediaoù hag ar podskignadoù.

Taolet e vo evezh ouzh al liammoù strizh a vez etre Bro arz hag istor e Treger, douget gant LTK dre an eil ahel : « Glad sevenadurel dizanvezel : ur vro m'en em gav lennegezh dre gomz ha dre skrid, sevenadurioù poblek ha helennek », hag ar brastres-kumuniezh evit reiñ lañs d'ar brezhoneg.

An ahel-mañ a sell ivez ouzh an aveadurioù sport ha sevenadurel, evel salioù-arvest ar Wareg / an Erv ha palier an Dourven, an aveadurioù sevenadur skiantel, evel an akwariom hag ar planetariom, ar skol sonerezh hag an holl skourroù anezhi.

Gantañ e kinniger kas implij ar brezhoneg war-raok ha lakaat ar glad sevenadurel dizanvezel war-wel : dre ar c'hevredigezhioù a vez sikouret gant Lannuon-Treger Kumuniezh evit aozañ abadennoù sevenadurel ha sport ; dre an embregerezhioù hag an obererien war dachenn an touristerezh, pa vez abadennoù natur pe da-geñver politikerezh OTK evit an diorren touristel hag er brastres evit an touristerezh.

Bodet eo bet an oberoù a sell ouzh an dud war an oad e div fichenn. Enne zo kaoz eus ar vuhez pemdez, da-geñver ar sikour d'an dud kozh, KOSE ha Lannuon-Treger Kenskoazell (AHDOD, skoazell er gêr, kas predoù, degemer en tiez Frañs Servij), hag eus an oberoù all gant Ahdod ar C'havell.

Evit a sell ouzh kefridioù LTK e kinniger ober evel-henn :

- Lakaat ar wazourien e LTK hag en aozadurioù liammet outi da vevañ ar brezhoneg hag ar glad sevenadurel dizanvezel war ar pemdez e-kerzh mareoù dudius, prezegennoù hag abadennoù all (sellet ouzh ar fichenn ober 3.1). Un ober nevez eo.
- Abalamour da lakaat al liamm skoulmet gant Bro arz hag istor war-wel (sellet ouzh ar fichenn ober 3.2) ha da gadarnaat anezhañ e vo kemeret perzh e-barzh ar poellgor skiantel ha kenaozet e vo abadennoù da-geñver mizvezh ar brezhoneg. Un ober nevez eo.
- Er fichennoù 3.3, 3.4 ha 3.5 eo bet renablet an implijoù a vo graet eus ar brezhoneg war dachenn an abadennoù buheziñ, an deskadurezh hag e programmoù an aveadurioù sport ha sevenadurel : ar salioù-arvest e Landreger (C'hoariva ar Wareg) hag e Pleuvihan (an Erv), palier an Dourven, Planetariom Breizh, an akwariom-mor e Tregastell hag ar skol sonerezh kumuniezhel.
- Brudañ an abadennoù natur hag endro, graet pe sikouret gant LTK (sellet ouzh ar fichenn ober 3.7), a gaver el levrig 'Les espaces nat' s'animent / Diduamantoù en takadoù natur' hag an abadennoù brezhonek war an endro evit sachañ an evezh ha lakaat ar glad naturel e Treger war-wel. Ar brezhoneg zo ur yezh pinvidik hag a sell ouzh an natur gant gerioù ha metaforennoù a bep seurt.
- Lakaat Ti an Douristed Aod ar Vein Ruz (sellet ouzh ar fichenn ober 3.7) da vrudañ pinvidigezh ar brezhoneg hag ar glad sevenadurel dizanvezel evit sachañ evezh an douristed. Boulc'het eo bet al labour dija, asambles gant Ti ar Vro.

Evit a sell ouzh oberourien an tiriad e vezer e-sell da gas an oberoù-mañ da benn :

- An oberoù 3.8 ha 3.9 a sell ouzh al lenn/al lennegezh hag an arvestoù bev/ar c'hoariva e brezhoneg. Kaset e vo ur preder da benn evit reiñ lañs d'an div dachenn diazez-mañ abalamour m'int talvoudus-bras evit derc'hel gant ur yezh vev hag a vo implijet er bed sokial. Daou ober nevez int.
- Kinnig d'an embregerezhioù lec'hel ha d'an obererien a labour asambles gant Ofis touristerezh ar gumuniezh sikour anezhe da dalvoudekaat an implij sokial eus ar brezhoneg, ar sevenadur hag ar glad dizanvezel e Treger (sellet ouzh ar fichenn ober 3.10).
- Broudañ ar mediaoù hag ar grouerien podskignadoù e brezhoneg, hag a skign traoù digor d'an holl, da lakaat ar brezhoneg hag ar glad dizanvezel e Treger war-wel (sellet ouzh ar fichenn ober 3.11).
- Kinnig d'ar c'hevredigezhioù a vez oc'h aozañ abadennoù sport ha sevenadurel, ha sikouret gant arc'hant LTK, lakaat kreskiñ ar plas roet d'ar brezhoneg ha d'ar glad dizanvezel breton en o abadennoù (sellet ouzh ar fichenn ober 3.12). Ar pal eo reiñ lañs d'ar brezhoneg er bed sokial e Treger.

Evit a sell ouzh an dud kozh hag ar frammoù degemer e vezer e-sell da gas an oberoù-mañ da benn :

- Gant an ober 3.13 e vo sellet ouzh plas ar brezhoneg e-mesk an dud kozh dre ar skoazelloù d'an dud gant KOSE, Lannuon-Treger Kenskoazell, an AHDODOù hag al Lec'hioù Frañs Servij. Sklaer eo ar pal. Fellout a ra deomp miret ouzh ar vrezhonegerien a-vihanik d'en em gavout en digenvez pa ne c'hallont ket mont ouzh ar re all en ur yezh all, lakaat anezhe da zerc'hel gant o barregezhioù anaoudel hag aesaat dezhe skoulmañ liammoù sokial ha dudius gant tud all, ha pa vefent er ger pe en un annez bennak.
- Savet eo bet ar fichenn ober 3.14 evit kemer ar brezhoneg e kont e-barzh Ahdod kumuniezhel ar C'havell e Trebeurden, da-geñver al liammoù a vez skoulmet gant ar vuhezourien ha gant ar c'hoskor prederiañ.

**BRASTRES EVIT REIÑ LAÑS D'AR BREZHONEG
SCHEMA EN FAVEUR DE LA LANGUE BRETONNE 2025-2030**

GWELET HA KLEVET
Ahel 1 : Reiñ da welet ha da glevet brezhoneg er vuhez foran

Politikerezhioù ha kefridioù LTK

1.1 teulioù titouriñ ha kehentiñ gant LTK hag an aozadurioù liammet outi

1.2 Panellerezh divyezhek

1.3 Reiñ da glevet brezhoneg er vuhez foran

1.4 Lakaat ar brezhoneg war-wel war an dachenn niverel ha brudañ

1.5 Luskañ ar garta Ya d'ar brezhoneg e LTK war-du al live 3 Kenurzhiañ ar brastres-kumuniezh

Politikerezhioù ha kefridioù an tiez-kêr

1.6 Buheziñ ha brudañ ar brezhoneg er poloù hag en tiez-kêr

Politikerezhioù ha kefridioù LTK

2.1 Broudañ ar wazourien hag an dilennidi da zeskiñ brezhoneg, steufiv stummañ

2.2 Aesaat d'ar vugale ober gant ar brezhoneg adalek an oad tenerañ

2.3 Aesaat reiñ ur plas d'ar brezhoneg ha da danvez sevenadurel Breizh e-barzh an obererezhioù bugale-yaouankiz

An dud dre-vras hag an obererien er c'horn-bro

2.4 Deskiñ brezhoneg (tud deuet ha skolidi)

2.5 Raktresoù micherel e brezhoneg

BEVAÑ DRE AR BREZHONEG ER VUHEZ SEVENADUREL HA WAR AR PEMDEZ
Ahel 3 : Bevañ dre ar brezhoneg er vuhez sevenadurel ha war ar pemdez

Er servijoù hag an azeadurioù meret gant LTK

3.1 Lakaat implijidi ha dilennidi LTK da vevañ ar brezhoneg ha sevenadur Breizh

3.2 Bro arz hag istor

3.3 Azeadurioù sevenadurel – salioù-arvest ha palier an Dourven

3.4 Azeadurioù sevenadurel skiantel – akwariom ha planetarium

3.5 Skol sonerezh

3.6 An oberoù douget gant renerezh an endro

3.7 Touristerezh

Kumunioù hag obererien er c'horn-bro

3.8 Lenn brezhoneg

3.9 C'hoariva hag arvestoù-bev e brezhoneg

3.10 Embregerezhioù hag obererien an touristerezh

3.11 Mediaoù, podskignadoù

3.12 Abadennoù sevenadurel ha sport

Tud war an oad ha frammoù degemer

3.13 An dud kozh

3.14 Ahodod ar C'havell

Ahel 1	GWELET HA KLEVET BREZHONEG Reiñ da welet ha da glevet brezhoneg er vuhez foran
Ober 1.1	Kemer ar brezhoneg e kont e-barzh an holl deulioù titouriñ ha kehentiñ gant LTK hag an aozadurioù liammet outi (OTK, KOSE, LTK, SK, KEK, KPLT, Kuzul diorren ha kement zo).
Palioù	Adsoñjal ar modoù-ober diouzh natur pep skor evit lakaat ar brezhoneg war-wel e-barzh an holl deulioù.
Evit piv ?	An holl dud e pep lec'h e takad LTK, an holl servijoù gant LTK hag an aozadurioù liammet outi
Danvez an ober	• Sevel ar renabl eus an holl deulioù ma vank ar brezhoneg (fakturennoù, reoladurioù diabarzh, fichennnoù teknikel...) • Kadarnaat ar garta c'hrafek ma vo kinniget ar pennaennoù degemeret evit pep kefridi ha kement seurt skor a zo : ◦ Ar skoroù kehentiñ : plegfollennoù, levrigoù, kannadigoù, programmoù, magazin, lec'hiennoù internet, rouedadoù sokial ha kement zo (da vezañ klokaet gant OTK, LTK, KPLT...) ◦ An teulioù titouriñ diwar-benn ar servijoù publik : eurioù digeriñ, fichennnoù teknikel (sk : SPYD), fakturennoù (sk : DDHH, SSKT, Dour ha Yac'husaat...) ◦ An teulioù melestradurel : logoioù, paperioù talbennet, pedadennoù, kartennoù-bizit, bannoù-sinañ er posteloù ha kement zo. ◦ Ar skoroù dre gomz : kemennadennoù ar responterioù (an degemer er sez, TSAT, an holl servijoù d'an dud), lidoù ofisiel • Brudañ ar garta ha lakaat anezhi e pleustr, dre genlabour gant ar servijoù a sell ar garta oute (sachañ dreist-holl evezh an dud dave war ar c'hehentiñ) • Ur pennad troet penn-da-benn e-barzh an T • Miret ur pennad e galleg evit brudañ ar brezhoneg • Ober diouzh ma ne vo ket sellet ouzh an divyezhegezh evel ouzh ur redi kehentiñ, stummañ ar wazourien war an divyezhegezh evit derc'hel kont anezhi en ur mod par-ouzh-par er c'houlzadoù kelaouiñ.
Doareoù ha Servijoù empleget	Servij kehentiñ ha kenlabour gant an holl servijoù Post brezhoneg – Pol dafar
Kevelerien	OPAB (treiñ, heuliañ ar Garta Ya d'ar brezhoneg), Ti ar Vro (treiñ, empennañ ar skoroù...), tud en o-unan (testennoù evit magazin LTK...)
Peseurt dispignoù ?	Kemer ar brezhoneg e kont er skoroù kehentiñ

Ahel 1	GWELET HA KLEVET BREZHONEG Reiñ da glevet brezhoneg er vuhez foran
Ober 1.2	Lakaat panelloù divyezhek diavaez ha diabarzh bep taol er savadurioù hag en takadoù meret gant LTK, ha testennoù divyezhek war ar c'harbedoù
Evit piv ?	An holl servijoù e LTK hag an aozadurioù liammet outi, Lec'hioù Frañs Servijoù
Palioù	Lakaat ar brezhoneg war-wel en hentoù foran, en takadoù foran hag er savadurioù melestradurel, en ur mod par-ouzh-par galleg/brezhoneg
Danvez an ober	- Kadarnaat ar garta c'hrafek ma vo termenet ar reolennoù evit lakaat brezhoneg war-wel er panellerezh diavaez ha diabarzh, e-barzh al lec'hioù hag ar savadurioù a bep seurt (takadoù labourerezh, madoù diloc'h an embregerezhioù, aveadurioù digor d'an holl, savadurioù melestradurel, gwaskedoù-bus/pennoù postoù, panellerezh-heñchañ ha kement zo) ha war karbedoù ar gumuniezh - Sevel ar renabl eus ar panelloù a zo anezhe dija, difaziañ ha klokaat lec'h zo mankoù evit an aveadurioù all, ar panelloù kinnig - Soñjal en a-raok eo dav kemer skeudennoù ar panellerezh e kont er galvoù da ginnigoù - Lakaat brudañ hag ober diouzh karta pleustriñ an divyezhegezh, asambles gant ar servijoù : sachañ evezh an dud a zo e penn an aveadurioù, ar c'hoskor degemer, an dud dave war ar c'hehentiñ, dedennañ an tiez-kêr da vont war an hent-se pa vez LTK ar skoazeller mestr oberiadur.
Doareoù ha Servijoù empleget	Servijoù teknikel (l gwazour gouestlet d'ar panellerezh er servij kempenn ar savadurioù hag atalier karri e LTK), dre genlabour gant ar servijoù all (kehentiñ, diorren ekonomikel, sport/sevenadur, KOSE ha kement zo) Post brezhoneg – Pol dafar
Kevelerien	Ofis publik ar brezhoneg OPAB (treiñ)
Peseurt dispignoù ?	N'eus bet rakwelet tamm dispign difer ebet evit ar panellerezh ordinal.

Ahel 1	GWELET HA KLEVET BREZHONEG Reiñ da welet ha da glevet brezhoneg er vuhez foran
Ober 1.3	Reiñ da glevet brezhoneg er vuhez foran
Evit piv ?	An dilennidi hag ar wazourien e Lannuon-Treger Kumuniezh, ar boblañs a-bezh, ar c'humunioù hag an holl obererien war dachenn ar brezhoneg
Palioù	Klevet muioc'h a vrezhoneg er vuhez foran
Danvez an ober	- Gallout klevet brezhoneg en aveadurioù LTK, dre anvioù an arsavioù e-bourzh ar busoù, el lec'hioù-degemer, er c'hoarivaoù ar Wareg hag an Erv, er planetariom, en akwariom hag e-barzh an holl aveadurioù-kumuniezh all - Krouiñ bommoù brudañ
Doareoù ha Servijoù empleget	Post brezhoneg – Pol dafar Servij kehentiñ, renerezh ar sevenadur, servij treuzdougen
Kevelerien	Kevelerien arbennik war an treiñ, an advouezhiañ hag ar c'hrouiñ son e brezhoneg
Peseurt dispignoù ?	Krouiñ skoroù kehentiñ difer

Ahel 1	GWELET HA KLEVET BREZHONEG Reiñ da welet ha da glevet brezhoneg er vuhez foran
Ober 1.4	Lakaat ar brezhoneg war-wel war an dachenn niverel ha brudañ anezhañ
Evit piv ?	An dud a zo o chom e Lannuon-Treger Kumuniezh
Palioù	Lakaat ar brezhoneg war-wel war an dachenn niverel dre lec'hienn internet LTK, Reiñ lañs d'an oberoù brezhonek er vro
Danvez an ober	• Implijout ur bajenn eus lec'hienn internet LTK evit brudañ hec'h oberoù evit ar brezhoneg • Kreskiñ plas ar brezhoneg el lec'hienn internet hag er rouedadoù sokial evit lakaat ar yezh war-wel muioc'h c'hoazh. • Kelaouiñ tud ar vro dre al lec'hienn internet diwar-benn ar servijoù a vez kinniget e brezhoneg er c'hornad (pelec'h kavout ur skol divyezhek, kentelioù brezhoneg, ur skoazeller-mamm brezhonek, e pelec'h klevet brezhoneg...) • Krouiñ un teul, ur skritell pe ur blegfollenn da skouer, gant ar renabl eus al lec'hioù ma c'haller : 'Gwelet, Klevet, Komz, Deskiñ' er c'hornad, da vezañ lakaet en tiez-kêr hag el lec'hioù foran evit ober bruderezh e-mesk tud ar vro.
Doareoù ha Servijoù empleget	Post brezhoneg – Pol dafar Servij kehentiñ
Kevelerien	Obererien war dachenn ar brezhoneg e takad LTK Ofis publik ar brezhoneg
Peseurt dispignoù ?	Krouiñ skoroù difer

Ahel 1	GWELET HA KLEVET BREZHONEG Reiñ da welet ha da glevet brezhoneg er vuhez foran
Ober 1.5	Luskañ ar garta Ya d'ar brezhoneg e diabarzh LTK ha kenurzhiañ ar brastres-kumuniezh evit reiñ lañs d'ar brezhoneg
Evit piv ?	An dilennidi hag ar wazourien e Lannuon-Treger Kumuniezh, an holl dud er c'hornad, an tiez-kêr hag an obererien war dachenn ar brezhoneg
Palioù	Aozañ ha taol evezh ouzh ar mod ma vez lakaet an oberoù dibabet er garta Ya d'ar brezhoneg e pleustr e Lannuon-Treger Kumuniezh. Reiñ da c'houzout zo eus al labour-se, d'ar wazourien ha d'an dilennidi en diabarzh, ha d'an dud dre-vras en diavaez. Kenurzhiañ ha taol evezh ouzh ar mod ma vez lakaet ar brastres e pleustr en diabarzh koulz hag en diavaez gant an dud, an tiez-kêr hag an obererien er vro
Danvez an ober	- Tizhout live 3 ar garta Ya d'ar brezhoneg. Lakaat an oberoù e pleustr ha sellet pizh oute a vloaz da vloaz (aozañ un daolenn-vourzh, buheziñ hag abadennoù...) - Sachañ evezh an dud ha kehentiñ diwar-benn politikerezh ar strollegezh evit reiñ lañs d'ar brezhoneg, sevel skoroù kehentiñ - Kenurzhiañ ha taol evezh ouzh ar mod ma vez lakaet oberoù ar brastres e pleustr, luskañ ur strollad dilennidi liammet ouzh ar brastres hag ur strollad obererien lec'hel e-barzh ur poellgor leviañ - Priziañ ha neveziñ ar politikerezh hag ar brastres
Doareoù ha Servijoù empleget	Post brezhoneg – Pol dafar Servij kehentiñ
Kevelerien	OPAB (luskañ ar garta YAB, brudañ kelenn ar brezhoneg, treiñ) Ti ar Vro (sikour ha kuzulioù evit lakaat oberoù ar brastres e pleustr)
Peseurt dispignoù ?	Kenemglev gant OPAB Krouiñ skoroù kehentiñ difer

Ahel 1	GWELET HA KLEVET BREZHONEG Reiñ da glevet brezhoneg er vuhez foran
Ober 1.6	Buheziñ ha brudañ ar brezhoneg en tiez-kêr
Evit piv ?	An holl diez-kêr e LTK
Palioù	Brudañ ar garta Ya d'ar brezhoneg en tiez-kêr e LTK Sikour an tiez-kêr da vrudañ ar brezhoneg
Danvez an ober	- Kemer perzh e-barzh an emvodoù poloù abalamour da reiñ lañs d'an oberoù evit ar brezhoneg a c'hallfe bezañ lakaet e pleustr en tiez-kêr (levrigoù familh divyezhek, lidoù eurediñ divyezhek...) - Aozañ emgavioù gant un ti-kêr pe gant meur a hini asambles ha sikour anezhe da lakaat ar garta Ya d'ar brezhoneg e pleustr hervez al live dibabet
Doareoù ha Servijoù empleget	Post brezhoneg – Pol dafar
Kevelerien	OPAB
Peseurt dispignoù ?	Abadennoù buheziñ

Ahel 2	TREUZKAS Deskiñ brezhoneg a-rumm-da-rumm
Ober 2.1	Broudañ ar wazourien hag an dilennidi e LTK da zeskiñ brezhoneg hag aesaat dezhe en ober
Evit piv ?	An holl implijidi hag an holl dilennidi (kumuniezh ha bodadoù) e LTK
Palioù	Broudañ an implijidi hag an dilennidi da zeskiñ un tamm brezhoneg pe da vont pelloc'h gant an implij anezhañ abalamour da gaout tud divyezhek pe gante un anaoudegezh diazez. Brudañ ha reiñ lañs d'an implij sokial eus ar brezhoneg dre ar c'hefridioù
Danvez an ober	- Kinnig kentelioù war ar brezhoneg ha danvez sevenadurel Breizh evit a bep seurt liveoù e-pad an ehan kreisteiz e LTK (er sez pe el lec'hiennoù diavaez, diouzh ar goulennoù) - Sevel ur steuñv stummañ war ar brezhoneg evit lakaat ar wazourien da zeskiñ ar yezh pe da vont pelloc'h ganti. Ouzhpennañ ul lodenn stummañ 'micherel' evit lakaat ar wazourien da vezañ muioc'h en o bleud gant ar yezh pe d'anavezout, da nebeutañ, un toullad gerioù hag a gord gant kefridioù zo (daremprediñ an dud kozh, pe ar vugaligoù, da skouer, pe evit an degemer, ...) - Renabliñ ha kelaouiñ ar wazourien war ar c'hinnigoù stummadurioù e-maez o amzer labour (kentelioù-noz, kentelioù niverel, dre lizher) ha war ar sikourioù evit ar stummadurioù hiroc'h - Kaout un den dave divyezhek er strollegezh evit sikour ar servijoù - Aozañ un enklask bep 5 bloaz evit gouzout pegen dedennet eo ar wazourien gant ar brezhoneg. Adimplijout goulennoù an enklaskoù graet e 2019 ha 2024 evit gwelet ar cheñchamantoù
Doareoù ha Servijoù empleget	Pol dafar – post brezhoneg Renerezh ar c'hoskor
Kevelerien	KBMPT Ti ar Vro pe un aozadur stummañ all
Peseurt dispignoù ?	Kentelioù brezhoneg e-pad an ehan kreisteiz

Ahel 2	TREUZKAS Deskiñ brezhoneg a-rumm-da-rumm
Ober 2.2	Aesaat d'ar vugale ober gant ar brezhoneg adalek an oad tenerañ (takadoù liesdegemer hag Erlec'hioù kerent bugale)
Evit piv ?	Ar vugale a vez degemeret er magourioù hag en erlec'hioù kerent bugale (EKB) meret gant KOSE ha LTK
Palioù	Reiñ lañs d'an divyezhegezh abred e-mesk ar re vihanañ evit kreñvaat ha lakaat chadenn ar yezh da badout pell e Treger, gant sikour an implijidi divyezhek (degas ar gerioù a sell ouzh ar vuhez pemdez) ha/pe pourchaserien diavaez (lakaet da zont ur wech an amzer)
Danvez an ober	- Sachañ evezh an dud ha goulenn o alioù digante war ar pezh a sell ouzh deskiñ brezhoneg gant o bugale - Renabliñ ar skoazellerezed-mamm divyezhek a zo er vro - Renabliñ ar vrezhonegerien, brudañ hag aozañ stummadur ar wazourien er servijoù bugaligoù - Lakaat an implijidi vrezhonek da zegas ar gerioù brezhonek liammet ouzh ar vuhez pemdez er magourioù hag Erlec'hioù kerent bugale meret gant KOSE. - Sevel ur programm buheziñ ha lakaat obererien diavaez da zont el liesdegemeroù hag en erlec'hioù kerent bugale evit mareoù/obererezhioù resis (rimastelloù, sonerezh ha kement zo). - Labourat asambles gant ar servijoù evit dibab an dafar pedagogel hag ar panellerezh brezhonek - Labourat asambles gant ar gevelerien evit kendalc'h an deskadurezh etre an Erlec'hioù kerent bugale, ar magourioù hag ar skolioù
Doareoù ha Servijoù empleget	Post Brezhoneg - Pol dafar KOSE pol bugale-yaouankiz Renerezh ar C'hoskor evit ar steuñv stummañ
Kevelerien	Stummerezh : Ti ar Vro, KBMPT, ROUDOUR pe aozadurioù stummañ all Emelloù : kevredigezhioù arbennik war ar buheziñ e brezhoneg gant ar re vihanañ Kuzul-departamant 22 evit al labour gant ar skoazellerezed-mamm Deskadurezh-Stad evit kendalc'h an deskadurezh*
Peseurt dispignoù ?	Pourchasoù evit abadennoù, prezegennoù, abadennoù buheziñ Stummadur ar wazourien

Ahel 2	TREUZKAS Deskiñ brezhoneg a-rumm-da-rumm
Ober 2.3	Aesaat reiñ ur plas d'ar brezhoneg ha da danvez sevenadurel Breizh e-barzh an obererezhioù bugale-yaouankiz (DDHH, chomadennoù vakañsiñ)
Evit piv ?	Ar vugale a vez degemeret er c'hreizennoù dudi hag er chomadennoù vakañsiñ meret gant KOSE / LTK hag al lec'h yaouankiz
Palioù	Brudañ ar brezhoneg ha danvez sevenadurel Breizh, dezhe da vezañ traoù dudi evit ar vugale hag ar re yaouank, ha neuze d'ober ul lod eus o buhez pemdez
Danvez an ober	• Kemer ar brezhoneg ha danvez sevenadurel Breizh e kont e raktres pedagogel KOSE (kreizennoù-dudi ha chomadennoù vakañsiñ) • Lakaat ar raktresoù obererezhioù ha chomadennoù vakañsiñ da vont diouzh ar raktres pedagogel, gant oberoù e brezhoneg pe en div yezh ha/pe lec'h ma lakaer danvez sevenadurel Breizh hag al liesseurted sevenadurel da vezañ traoù bev • Kinnig obererezhioù pedagogel, arzel, dafar pedagogel, panelloù divyezhek er c'hreizennoù degemer • Sachañ evezh ar vuhezerien ha broudañ anezhe da vont en ur stummadur war ar brezhoneg ha war danvez sevenadurel Breizh (implijidi LTK ha pourchaserien) • Kinnig ur brezegenn / un atalier bep bloaz war an divyezhegezh hag ar gerentelezh da-geñver pemzektevezh ar gerentelezh
Doareoù ha Servijoù empleget	Post brezhoneg – Pol dafar KOSE pol bugale-yaouankiz Renerezh ar C'hoskor evit ar steuñv stummañ
Kevelerien	Stummerezh : Bretagne Culture Diversité / Sevenadurioù Breizh, Ti ar Vro, KBMPT, ROUDOUR pe aozadurioù stummañ all Emelloù : Ti ar Vro pe ur gevredigezh arbennik all war ar buheziñ e brezhoneg gant bugale ha tud yaouank, arzourien, arvestoù evit ar vugale
Peseurt dispignoù ?	Pourchasoù evit abadennoù, prezegennoù, abadennoù buheziñ Stummadur ar wazourien

Ahel 2	TREUZKAS Deskiñ brezhoneg a-rumm-da-rumm
Ober 2.4	Brudañ hag aesaat an deskiñ brezhoneg (tud deuet ha skolidi)
Evit piv ?	An dud a zo o chom e LTK, ar skolidi
Palioù	Lakaat an niver a yezherien da greskiñ hag an anaoudegezh / implij eus ar brezhoneg da badout er c'hornad
Danvez an ober	• Sachañ evezh an dud war an interest a zo d'ober gant ar yezh er vuhez sokial • Renabliñ ar pezh a vez kinniget d'ar skolidi ha d'an dud deuet er c'hornad, skignañ an titouroù e lec'hienn LTK hag er rouedadoù sokial (skol.bzh, Ti ar Vro...) • Skignañ koulzad rannvroel an OPAB war an deskiñ brezhoneg gant an dud deuet ha gant ar skolidi (paeañ ar frejoù evit moullañ ar skritelloù ha kas anezhe d'ar c'humunioù, skignañ ar c'houlzad dre skoloù kehentiñ LTK) • Kendivizout gant Ofis publik ar brezhoneg hag an akademiezh (ensellerien-departamant hag ensellerien-rannvro war ar brezhoneg) diwar-benn an hentadoù nevez : digeriñ klasoù divyezhek er skolioù-mamm, er skolioù kentañ derez, er skoloù hag el liseoù. Sikour ar skolioù hag ar c'humunioù o do c'hoant. • Kendivizout gant ar gelennerien vrezhonek hag aozañ kejadenoù tematek evit lakaat ar brezhoneg war-wel er salioù-klas ha krouiñ liammoù etre ar gelennerien divyezhek.
Doareoù ha Servijoù empleget	Post brezhoneg – Pol dafar Renerezh ar c'hehentiñ
Kevelerien	Deskadurezh-Stad Ar c'humunioù OPAB Div Yezh, Divaskell, Diwan hag an obererien all eus ar gumuniezh-kumunioù a labour da vrudañ ha da gelenn brezhoneg
Peseurt dispignoù ?	Aozañ kejadenoù, prezegennoù

Ahel 2	TREUZKAS Deskiñ brezhoneg a-rumm-da-rumm
Ober 2.5	Brudañ ar raktresoù micherel e brezhoneg
Evit piv ?	An dud a zo o chom e LTK, ar skolajidi hag al liseidi
Palioù	Titouriñ ar skolajidi, al liseidi hag an dud deuet a zo o cheñch oberiantiz war marc'had al labour e brezhoneg
Danvez an ober	• Sachañ evezh an dud war ar pezh a zegas ar brezhoneg er vuhez sokial gant ur raktres micherel • Renabliñ an aozadurioù a c'hall titouriñ ha sikour ar skolidi hag an dud deuet war hent al labour. • Kaout ur preder asambles gant ar gevelerien-se war ur strategiezh brudañ ar brezhoneg e-mesk ar c'hlasakerien labour • Reiñ da gompren d'ar skolidi ha d'an dud deuet, pa ouzont brezhoneg, ez eo ur varregezh hag a c'hall bezañ talvoudus dezhe en o raktres micherel • Rentañ kont eus stad al labour e brezhoneg e Breizh hag e LTK
Doareoù ha Servijoù empleget	Post brezhoneg – Pol dafar
Kevelerien	Kreizenn kelaouiñ ha heñchañ Kefridierezh lec'hel Frañs Labour Aozadurioù stummañ micherel e brezhoneg Rannvro ha departamantoù, stignad Desk
Peseurt dispignoù ?	Sevel ur rouedad, tizhout tud a bep seurt

Ahel 3	BEVAÑ DRE AR BREZHONEG ER VUHEZ SEVENADUREL HA WAR AR PEMDEZ
Ober 3.1	Lakaat implijidi ha dilennidi LTK da vevañ ar brezhoneg ha danvez sevenadurel dizanvezel Breizh
Evit piv ?	An holl implijidi hag an holl dilennidi (kumuniezh ha bodadoù) e LTK
Palioù	Lakaat ar brezhoneg da vezañ ur yezh hag a vez komzet etreze gant gwazourien ha dilennidi e LTK, kinnig mareoù dudioù e brezhoneg
Danvez an ober	• Skignañ filmoù brezhonek istitlet e galleg, abalamour d'an holl wazourien da c'hallout sellet oute. Krouiñ ur gont e BreizhVOD, ar savenn streaming evit sellet ouzh filmoù brezhonek • Aozañ obererezhioù evit ar wazourien : prezegennoù war danvez sevenadurel Breizh, kaozeadennoù, abadennoù brezhonek, festoù-deiz
Doareoù Servijoù empleget	Post brezhoneg – Pol dafar Renerezh Sevenadur ha Sport / Bro arz hag istor e Treger
Kevelerien	Ti ar Vro Kevredigezhioù ha brezhonegerien eus ar vro Bro arz hag istor e Treger
Peseurt dispignoù ?	Emezelañ da vBreizh VOD Prezegennoù, abadennoù

Ahel 3	BEVAÑ DRE AR BREZHONEG ER VUHEZ SEVENADUREL HA WAR AR PEMDEZ
Ober 3.2	Lakaat ar brezhoneg da vevañ dre oberoù Bro arz hag istor e Treger
Evit piv ?	An holl, tud ar vro, politikerezh sevenadurel Lannuon-Treger Kumuniezh
Palioù	Kemer ar brezhoneg e kont e-barzh ar politikerezh buheziñ ar Vro arz hag istor, abalamour d'ober gantañ ivez evit lakaat Bro-Dreger war-wel Sikour lakaat ar glad sevenadurel dizanvezel war-wel, a lakaer ar gaoz warnañ en eil ahel Bro arz hag istor e Treger : « Glad sevenadurel dizanvezel : ur vro ma kaver kichen-ha-kichen lennegezh dre gomz ha dre skrid, sevenadurioù poblek ha helennek »
Danvez an ober	• Kendivizout ha magañ ar preder war ar c'heleier a sell ouzh ar glad sevenadurel dizanvezel hag ouzh ar brezhoneg • Kemer perzh e poellgor skiantel Bro arz hag istor e Treger • Ober kinnigoù e-barzh an ahel glad sevenadurel dizanvezel ha lakaat ar brezhoneg da vevañ en ur reiñ plas dezhañ e kement ahel a zo e raktres sevenadurel ar Vro arz hag istor • Kenaozañ oberoù da-geñver mizvezh ar brezhoneg, a vez douget gant Rannvro Breizh • Brudañ ar prezegennoù e brezhoneg ha treiñ anezhe war ar prim, abalamour d'an holl dud da c'hallout kemer perzh enno
Doareoù Servijoù empleget	Post brezhoneg – Pol dafar Renerezh Sevenadur ha Sport Label Kêr arz hag istor
Kevelerien	Kevredigezhioù ha brezhonegerien eus ar vro Troerien vrezhonek arbennik war an treiñ war ar prim Bro arz hag istor e Treger / Servij Bevaat ar Savouriezh hag ar Glad
Peseurt dispignoù ?	Aozañ abadennoù da-geñver mizvezh ar brezhoneg Treñ prezegennoù war ar prim e brezhoneg-galleg

Ahel 3	BEVAÑ DRE AR BREZHONEG ER VUHEZ SEVENADUREL HA WAR AR PEMDEZ
Ober 3.3	Lakaat ar brezhoneg ha glad sevenadurel dizanvezel Breizh da vevañ da-geñver politikerezh skignañ sevenadurel LTK (programm bloaziek er salioù-arvest, palier an Dourven, raktresoù hag hanterouriezh sevenadurel)
Evit piv ?	An holl, skolidi ar vro, implijerien salioù-arvest LTK (c'hoariva ar Wareg e Landreger, sal an Erv e Pleuvihan) ha re palier an Dourven
Palioù	Reiñ da glevet brezhoneg ha reiñ d'anavezout pinvidigezh glad dizanvezel sevenadurel Breizh da-geñver ar politikerezh skignañ sevenadurel
Danvez an ober	- Degemer e salioù LTK bep bloaz un arvest pe zaou hag a laka ar yezh ha glad sevenadurel dizanvezel Breizh war-wel, ha lakaat anezhañ/anezhe e-barzh ar programm abadennoù evit an holl - Aozañ un abadenn hanterouriezh sevenadurel en-dro d'an arvest-se evit tud a bep seurt : skolidi, stummadurioù hir war ar brezhoneg, kevredigezhioù ha kement zo. - Broudañ an dud a zo o labourat e degemer ar salioù-arvest d'en em stummañ war ar brezhoneg (ar c'hoskor degemer evit titouriñ an dud) - Degemer an dud ha reiñ kemennoù e brezhoneg e deroù pep abadenn. Skoroù aodio.
Doareoù Servijoù empleget	Renerezh Sevenadur ha Sport Salioù-arvest LTK Palier an Dourven Post brezhoneg – Pol dafar
Kevelerien	Arzourien Obererien sevenadurel hag a c'hall kinnig obererezhioù hanterouriezh
Peseurt dispignoù ?	Arvestoù lakaet e-barzh programm sevenadurel ar Wareg / an Erv Obererezhioù hanterouriezh sevenadurel dre ar budjed sevenadur

Ahel 3	BEVAÑ DRE AR BREZHONEG ER VUHEZ SEVENADUREL HA WAR AR PEMDEZ
Ober 3.4	Lakaat ar brezhoneg war-wel en aveadurioù hag en abadennoù a sell ouzh ar sevenadur skiantel. Akwariom-mor Tregastell, Planetariom Breizh, Gouel ar Skiantoù
Evit piv ?	Implijerien an aveadurioù sevenadur skiantel e LTK hag ar weladennerien e Gouel ar Skiantoù
Palioù	Lakaat ar brezhoneg war-wel en aveadurioù hag ober gantañ pa vez aozet obererezhioù hag abadennoù skiantel evit an holl hag evit ar skolidi
Danvez an ober	- Akwariom : miret an anvioù spesadoù brezhonek war ar skritelloù, e-kichen an anvioù ordin ha skiantel. Sevel mediaoù / skoroù e brezhoneg, abalamour da ginnig anezhe d'ar skolioù divyezhek ha d'an dud dre vras. Adwelet ar skrid brezhonek kinniget d'ar weladennerien. - Planetariom : treiñ an arvest "koskoriad an heol" adarre, pe un arvest all, diouzh ar pezh a vo diskwelet er Planetariom goude al labourioù. Kemer ar brezhoneg e kont er raktres treiñ un arvest evit ar Planetariom - Reiñ da c'houzout zo eus ar c'hinnigoù-se d'ar c'hlasoù divyezhek - Gouel ar Skiantoù : kinnig un abadenn divyezhek, pe meur a hini, diouzh an niver a gevelerien a vo war al lec'h en deiz-se, ha lakaat pannelloù divyezhek - Broudañ ar c'hoskor degemer, en aveadurioù skiantel, d'en em stummañ war ar brezhoneg
Doareoù Servijoù empleget	Aveadurioù sevenadur skiantel Renerezh Sevenadur ha Sport Post brezhoneg – Pol dafar
Kevelerien	Kevredigezhioù keveler arbennik war an abadennoù evit ar skolidi hag evit an holl Kevelerien evit treiñ hag advouezhiañ un arvest, pe meur a hini, evit ar Planetariom
Peseurt dispignoù ?	Arvest e brezhoneg er planetariom : lakaat treiñ hag advouezhiañ anezhañ e brezhoneg gant aktourien a vicher Obererezhioù buheziñ e brezhoneg er planetariom

Ahel 3	BEVAÑ DRE AR BREZHONEG ER VUHEZ SEVENADUREL HA WAR AR PEMDEZ
Ober 3.5	Reiñ ur plas d'ar brezhoneg ha da glad sevenadurel dizanvezel Breizh e-barzh politikerezh kelenn ar sonerezh e LTK
Evit piv ?	Ar vugale hag an dud deuet a zo o heuliañ kentelioù gant skol sonerezh Lannuon-Treger Kumuniezh
Palioù	Lakaat ar brezhoneg da vezañ ur yezh pemdez ha brudañ pinvidigezh glad sevenadurel dizanvezel Breizh da-geñver ar politikerezh kelenn ar sonerezh
Danvez an ober	• Gwellaat ar panellerezh brezhonek en holl skourroù eus ar skol sonerezh • Daou gelenner a c'hall reiñ kentelioù sonerezh e brezhoneg e skourr ar skol sonerezh e Lannuon : reiñ brud d'ar c'hinnig-se • Lakaat war-wel labour ar gelennered divyezhek, ganti un diplom skol-veur sonerezh-kelennerezh (DUM), a ra abadennoù brezhoneg-galleg er skolioù hag en erlec'hioù bugaligoù • Brudañ an abadennoù liammet ouzh sevenadur ha yezh Breizh a vez aozet e skourroù ar skol sonerezh
Doareoù Servijoù empleget	Skol sonerezh Lannuon-Treger Kumuniezh Renerezh Sevenadur ha Sport Post brezhoneg – Pol dafar
Peseurt dispignoù ?	Kentelioù binvioù ha kentelioù kan roet gant ar gelennerien a zo e skol sonerezh Lannuon-Treger

Ahel 3	BEVAÑ DRE AR BREZHONEG ER VUHEZ SEVENADUREL HA WAR AR PEMDEZ
Ober 3.6	Lakaat ar brezhoneg da vevañ ha lakaat an dud d'ober anaoudegezh gant e binvidigezh da-geñver an oberoù douget gant renerezh an endro
Evit piv ?	An holl, ar skolidi, an dilennidi, ar wazourien
Palioù	Ober muioc'h a draoù e brezhoneg da-geñver an oberoù a bep seurt douget gant renerezh an endro Kreskiñ ha brudañ ar c'hinnig abadennoù natur hag ar raktresoù deskiñ diouzh an endro e brezhoneg
Danvez an ober	- Kas war-raok ha brudañ ar brezhoneg e-barzh an oberoù douget gant renerezh an endro, evel da skouer Gouel al Leger, peotramant e-barzh an oberoù stag ouzh ar c'hevratou tiriadel hag ouzh brastres terkañ ha merañ an dour e Bae Lannuon - Pa vez embannet al levrig 'Les espaces naturels s'animent / Diduamantoù en takadoù natur', brudañ an abadennoù a laka ar brezhoneg war-wel (loened ha plant, louzoù, sonioù natur, istor al lin ha kement zo) - Aozañ un emvod-kelaouiñ bep bloaz asambles gant servij an takadoù natur, e deroù ar c'houlzad abadennoù, evit kinnig ar pezh a vo graet e brezhoneg - Brudañ ar c'hinnigoù abadennoù brezhonek aozet gant ar servij "takadoù natur" - Brudañ an abadennoù brezhonek pe divyezhek e-mesk an oberoù war an endro kinniget d'ar skolioù gant servij an endro - Renabliñ an obererien vrezhonek arbennik war an deskiñ diouzh an endro, krouiñ liammoù etreze Renabliñ ha nevesaat ar c'hinnig abadennoù
Doareoù Servijoù empleget	Renerezh endro Post brezhoneg – Pol dafar
Kevelerien	Obererien vrezhonek arbennik war an deskiñ diouzh an endro Skolioù, skolajoù ha liseoù ar vro, gant un hentenn divyezhek pe pas
Peseurt dispignoù ?	Oberoù da-geñver al levrig 'les espaces naturels s'animent / diduamantoù en takadoù natur' Sikour aozañ abadennoù difer Stummerezh difer evit ar wazourien

Ahel 3	Bevañ dre ar brezhoneg er vuhez sevenadurel ha war ar pemdez
Ober 3.7	Lakaat ar brezhoneg ha glad dizanvezel Breizh ha Bro-Dreger war-wel e-barzh ar c'hinnig evit an douristed
Evit piv ?	An douristed, an dud a zo o labourat e tiez an douristed
Palioù	Lakaat an dud d'ober anaoudegezh gant pinvidigezh ar brezhoneg ha gant hini glad sevenadurel dizanvezel Breizh, hag ober gante o-daou evit sachañ touristed etrezek hon bro Kreskiñ ha brudañ ar c'hinnig abadennoù ma lakaer ar yezh ha glad dizanvezel Bro-Dreger war-wel, da-geñver an ahel « glad » eus strategiezh Ofis Touristerezh ar Gumuniezh
Danvez an ober	• Renabliñ ha brudañ ar c'hinnigoù liammet ouzh ar yezh ha glad dizanvezel Bro-Dreger, da lavaret eo : • <i>e-barzh levrig an dudioù : labourat asambles d'ober un tamm kempenn d'an div bajenn war ar brezhoneg (+ geriaoueg) ha war sevenadur Breizh,</i> • <i>e-barzh levrig ar saouroù ha sturlevr al lojeiz :</i> sekredoù kegin eus ar vro + ur banniel BZH evit diskwel ar bodoù hag ar pretioù ma vez komzet brezhoneg + ur c'heriaoueg vihan • Miret plas evit kinnig ar brezhoneg hag implijout anezhañ e lec'hienn internet ti an douristed hag en e ostilhoù brudañ all evel ar blog « Essentiel Breizh » hag ar c'hwizoù « Culture Breizh » • Tra ma klasker kreskiñ stal an OT, en em soñjal war ar werzh levrioù pedagogel diwar-benn ar yezh hag ar sevenadur (da skouer war an anvioù familh, an anvioù lec'h ha kement zo...) • En em soñjal evit krouiñ un abadenn dre soubidigezh pe ziv (nozvezhioù, obererezhioù, emgavioù tañva, predoù en ostalerioù dalc'het gant brezhonegerien) Ur staj a c'hallfe bezañ kinniget ivez gant Ti ar Vro. Evit ar weladennerien intereset gant ar yezhoù hag ar sevenadurioù rannvroel (touristed pe tud ar vro) • Stummañ an implijidi (rannvloaziat pe pas) hag ar gevelerien war ar brezhoneg ha war sevenadur Breizh, ha war ar mod da vrudañ anezhe o-daou • Broudañ ar gevelerien war dachenn an touristerezh da lakaat ar brezhoneg ha glad dizanvezel Bro-Dreger war-wel ; kas ur preder diwar-benn obererezhioù kenwerzhel hag a c'hallfe bezañ savet asambles gant hon c'hevelerien Lakaat ar brezhoneg war-wel gant panelloù divyezhek e tiez an douristed...
Doareoù Servijoù empleget	Ofis touristerezh ar gumuniezh • Post brezhoneg – Pol dafar
Kevelerien	Kevelerien an OTK Stummerezh : Ti ar Vro, BCD / Sevenadurioù Breizh
Peseurt dispignoù ?	Stummañ war ar brezhoneg ha war « danvez sevenadurel Breizh »

Ahel 3	BEVAÑ DRE AR BREZHONEG ER VUHEZ SEVENADUREL HA WAR AR PEMDEZ
Ober 3.8	Derc'hel ar brezhoneg hag ar sevenadur bev dre al lennegezh hag al lenn e brezhoneg
Evit piv ?	An holl, skolidi, ar c'humunioù, al levraouegoù hag ar mediaouegoù-kêr
Palioù	Brudañ al lennegezh hag al lenn e brezhoneg
Danvez an ober	- Lakaat al lennegezh hag al lenn e brezhoneg war-wel, da bep oad, e-barzh levraouegoù ha mediaouegoù LTK hag ar stalioù-levrioù, gant abadennoù evit ar skolidi hag an holl - Sikour brudañ dalc'had brezhonek Levraoueg Aodoù-an-Arvor, a vez buhezhet ha meret gant Ti ar Vro e Kawan
Doareoù Servijoù empleget	Renerezh Sevenadur ha Sport Post Brezhoneg - Pol dafar
Kevelerien	Al levraouegoù hag ar mediaouegoù-kêr e LTK Kuzul ar Brezhoneg, ur c'hevredad kevredigezhioù breizhat war dachenn an embann Ar gelennerien
Peseurt dispignoù ?	Abadennoù, sevel skoroù brudañ

Ahel 3	BEVAÑ DRE AR BREZHONEG ER VUHEZ SEVENADUREL HA WAR AR PEMDEZ
Ober 3.9	Lakaat ar yezh hag ar sevenadur da vevañ dre ar c'hoariva hag an arvestoù-bev e brezhoneg
Evit piv ?	An holl, tud ar vro, ar skolidi
Palioù	Sikour brudañ ha skignañ, e takad LTK, ar pezhioù-c'hoari hag an arvestoù-bev a zo c'hoariet e brezhoneg penn-da-benn
Danvez an ober	En em soñjal asambles gant an aozerien abadennoù (festivalioù ha kevredigezhioù), dezhe da reiñ brud ha plas d'ar pezhioù-c'hoari ha d'an arvestoù-bev brezhonek en o frogrammoù, hag ivez gant obererien an arvestoù-bev hag ar c'hoariva e brezhoneg
Doareoù Servijoù empleget	Post brezhoneg – Pol dafar Renerezh Sevenadur ha Sport
Kevelerien	Kevredigezhioù lec'hel hag a aoz abadennoù Kompagnunezhioù hag arzourien vrezhonek
Peseurt dispignoù ?	N'eus bet termenet tamm ober ebet evit poent

Ahel 3	BEVAÑ DRE AR BREZHONEG ER VUHEZ SEVENADUREL HA WAR AR PEMDEZ
Ober 3.10	Skoazellañ embregerezhioù hag obererien an touristerezh a vrud hag a laka war-wel yezh ha sevenadur Breizh
Evit piv ?	Embregerezhioù hag obererien ar c'hornad a labour asambles gant ofis touristerezh ar gumuniezh,
Palioù	Sikour lañs an embregerezhioù hag an obererien douristel a laka war-wel an implij sokial eus ar yezh ha glad sevenadurel dizanvezel Bro-Dreger
Danvez an ober	• Termeniñ ha lakaat e pleustr ur politikerezh evit degas sikour d'an embregerezhioù a ra gant ar brezhoneg evit kreskiñ o obererezh ha kehentiñ (da sk. arloadoù niverel, implijout ar brezhoneg evit obererezhioù kenwerzh pe servijoù d'an dud...) • Renabliñ an obererien douristel a ginnig doareoù degemer nevezus hag a gemer ar brezhoneg ha glad dizanvezel Bro-Dreger e kont • Luskañ kaozeadennoù gant an obererien ekonomikel ha touristel evit brudañ ar brezhoneg, dre hantererezh Ti embregerezhioù ar gumuniezh ; reiñ skouerioù oberoù dezhe, evel ar re a zo er garta « Ya d'ar brezhoneg »
Doareoù Servijoù empleget	Post brezhoneg – Pol dafar Renerezh diorren ekonomikel OTK
Kevelerien	Ti ar Vro BCD / Sevenadurioù Breizh OPAB Produet e Breizh Frammoù keveler eus ar vro (ADIT, KKI, ADESS...)
Peseurt dispignoù ?	Skoazelloù arc'hant evit an embregerezhioù hag an obererien Stummadurioù, prezegennoù, abadennoù da sachañ an evezh

Ahel 3	BEVAÑ DRE AR BREZHONEG ER VUHEZ SEVENADUREL HA WAR AR PEMDEZ
Ober 3.11	Sikour ar skignañ hag an implij sokial eus ar brezhoneg er mediaoù ha gant podskignadoù
Evit piv ?	An holl, ar skolidi
Palioù	Brudañ ha lakaat war-wel ar brezhoneg, an implij sokial anezhañ hag an anaoudegezh eus glad dizanvezel Breizh
Danvez an ober	• Brudañ ar podskignadoù a zo bet savet e brezhoneg penn-da-benn – lakaat ober unan bep bloaz • Skoazellañ ar c'hleweled e brezhoneg e takad Lannuon-Treger Kumuniezh • Mont e darempred gant sinemaoù ha kevredigezhioù evit programmiñ filmoù brezhonek
Doareoù Servijoù empleget	Post brezhoneg – Pol dafar
Kevelerien	Mediaoù a bep seurt (kazetennoù, aodio, video) Kevredigezhioù Embregerezhioù sevenadurel
Peseurt dispignoù ?	Urzhiañ dalc'hadoù brezhonek, evel podskignadoù da skouer Skoazelloù arc'hant d'ar radioioù brezhonek

Ahel 3	BEVAÑ DRE AR BREZHONEG ER VUHEZ SEVENADUREL HA WAR AR PEMDEZ
Ober 3.12	Brudañ ar brezhoneg dre an abadennoù sevenadurel ha sport
Evit piv ?	Ar c'hevredigezhioù a ra war-dro abadennoù sevenadurel ha sport
Palioù	Lakaat kreskiñ ar plas roet d'ar brezhoneg en abadennoù aozet e takad LTK Reiñ lañs d'ar brezhoneg er bed sokial
Danvez an ober	• Embann ur c'hit, ennañ skouerioù panelloù ha frazennoù diazez e brezhoneg, evit an aozerien abadennoù sevenadurel ha sport • Sevel skoroù hag a c'haller adimplijout, warne divizoù diazez evit gallout komz un tamm brezhoneg ; a-hend-all skignañ skoroù hag a zo anezhe dija evit degouezhioù zo • Sevel ur c'hoari evit brudañ ar brezhoneg da-geñver ar festivalioù
Doareoù Servijoù empleget	Post brezhoneg – Pol dafar Renerezh Sevenadur ha Sport
Kevelerien	Ar c'hevredigezhioù a ra war-dro festivalioù pe abadennoù
Peseurt dispignoù ?	Sevel skoroù, kitoù e brezhoneg, c'hoarioù

Ahel 3	BEVAÑ DRE AR BREZHONEG ER VUHEZ SEVENADUREL HA WAR AR PEMDEZ
Ober 3.13	Aesaat d'an dud ober gant ar brezhoneg en aveadurioù hag er servijoù evit an dud kozh (KOSE, Lec'hioù Frañs Servij, AHDODOù)
Evit piv ?	An dud kozh, e pep lec'h e takad LTK, a implij ar servijoù lakaet e plas gant KOSE, al lec'hioù Frañs Servij, ar servij kas predoù, ar skoazell er gêr, Lannuon-Treger Kentskoazell
Palioù	Miret ouzh an dud d'en em gavout en digenvez, lakaat anezhe da zerc'hel gant o barregezhioù anaoudel, aesaat skoulmañ liammoù sokial ha dudius etre an dud kozh, an dud a zo o chom e frammoù degemer, an dud a resev skoazell ha predoù er gêr
Danvez an ober	• Stummañ an implijidi war ar yezh, en ur deuler evezh ouzh ar gerioù a sell ouzh ar vuhez pemdez hag ouzh perzhioù dibar brezhoneg Treger ; danvez ar c'hentelioù a zle kordañ gant labour ar servijoù ivez (AHDODOù, skoazell er gêr, kas predoù, savenn bellgomz LTK : ret e vo termeniñ petra ober da gentañ) • Kas ur c'houlennaoueg d'ar wazourien a zo o labourat e KOSE, e Lannuon-Treger Kentskoazell hag e LTK evit gouzout piv a oar brezhoneg en o mesk hag anavezout an ezhommoù stummañ hag an ezhommoù skoroù. (Skoazell er gêr, kas predoù, Lec'hioù Frañs Servij) e darempred gant strategiezh KOSE evit an dud kozh • Sevel pe adimplijout dafar brezhonek graet a-ratozh evit ar micherioù-se, abalamour da aesaat al liammoù hag ar c'haozeadennoù gant an dud kozh. • Termeniñ an ezhommoù troerien, lec'h ma vez degemeret an dud, abalamour da sikour ar re gozh da vezañ komprenet mat e kement degouezh zo • En em soñjal, da-geñver ar c'hevratou yec'hed ha yec'hed-spered lec'hel, war an implij eus ar brezhoneg evit ober gwelloc'h war-dro ar glañvourien er vro. • Sikour ar buhezour en AHDOD ar C'havell da lakaat war-sav ur programm abadennoù brezhonek (kaozeadennoù, c'hoariva...)
Doareoù Servijoù empleget	Post brezhoneg – Pol dafar KOSG, Lannuon-Treger Kentskoazell, kas predoù Renerezh ar C'hoskor evit ar steuñv stummañ
Kevelerien	Ti ar Vro, KBMPT Kevredigezhioù ha brezhonegerien eus ar vro
Peseurt dispignoù ?	Stummadur ar wazourien Krouiñ skoroù difer Troerien
Ahel 3	BEVAÑ DRE AR BREZHONEG ER VUHEZ SEVENADUREL HA WAR AR PEMDEZ

Ober 3.14	Aesaat d'an dud komz brezhoneg en AHDOD ar C'havell
Evit piv ?	An dud kozh a zo o chom en AHDOD ar C'havell
Palioù	Miret ouzh an dud d'en em gavout en digenvez, lakaat anezhe da zerc'hel gant o barregezhioù anaoudel hag aesaat dezhe skoulmañ liammoù sokial ha dudius gant tud all en AHDOD
Danvez an ober	• En AHDOD ar C'havell : sikour ar buhezour hag ar c'hoskor prederiañ e-keñver ar brezhoneg • Sikour lakaat war-sav ur programm abadennoù hag obererezhioù brezhonek (kaozeadennoù, c'hoariva...), luskañ ur rouedad brezhonegerien a-youl-vat hag a c'hallfe buheziñ kejadennnoù hag obererezhioù dre strolladoù bihan (tud a-youl-vat, kevredigezhioù...)
Doareoù Servijoù empleget	Post brezhoneg – Pol dafar KOSG, Lannuon-Treger Kenskoazell, kas predoù Renerezh ar C'hoskor evit ar steuñv stummañ
Kevelerien	Ti ar Vro Kevredigezhioù ha brezhonegerien eus ar vro KBMPT
Peseurt dispignoù ?	Stummadur ar wazourien Krouiñ skoroù difer,